

# *Breizh Brevez*

J.-C. Miossec

**TRIHORN AR BERMUDES**

Charlez ar Gall

**EVIL LOIEN HUDUR**

A. Keravel

**AR BREZONEG WAR-GIL ?**

**N° 79 - 1984**

# BRUD NEVEZ

**Kelaouenn vrezoneg mizieg.**

**Niverenn 79**  
**Miz du 1984**

Rener: Andreo Merser.  
Sekretour: Jakez Salaun.

*An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.*

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant bloaz:

- priz ordinal: 70 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- broiou estrañjour: 100 lur.

*Eur houmanant a dalv evid 10 niverenn.*

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Ar chekenou-post a zo da veza lakaet war K.R.P. « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro, da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Disklêriet hervez al lezenn:

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

*C. evid an oll bennadou.*

*N'eus ket a aotre da adembann eur pennad euz Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.*

*Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.*

*Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.*

Paeroniet e vez **Brud Nevez** gand **Emgleo Breiz**  
Publié avec l'aide du **Centre National des Lettres**

## Taolenn

|  |    |
|--|----|
| A.M. Maloney: Ho pedi a ran.....                               | 3  |
| Merzerien Gastellbriant: R.G.Cadou, X.....                     | 4  |
| Poent eo!: Ar Stourmer.....                                    | 5  |
| Trihorn ar Bermudès: J.C. Miossec.....                         | 6  |
| Eul loen hudur: Charlez ar Gall.....                           | 17 |
| Endro da Fantan Zant-Jeg: Paotr Jeg.....                       | 27 |
| Istor ar Habili: Y.L. Morvan.....                              | 37 |
| Ar brezoneg war-gil: A.K.....                                  | 43 |
| Emgleo Breiz diwar-benn R.B.O.....                             | 43 |
| War F.R.3.....   | 44 |
| War Radio-France-Armorique.....                                | 46 |
| Hag an danvez-lezenn 2157?: B.N.....                           | 48 |
| Kanaouennou nevez evid ar re yaouank (Tregeriz): J. Goyat..... | 50 |
| Barzoniez skeudennaouet: K. Riou.....                          | 52 |
| A beb seurt - Kemennou - Leoriou - Keleier: A. ar Merser.....  | 54 |

## Ho pedi a ran

Dre an intañvez he-deus kollet he gwaz  
A eve bemdez, a eve a-viskoaz  
War e vez e chom badaouet da viken  
Gand ar beurbadelez ne hell ket kompren

Dre strafuill ar béd o vond war wasaad  
Ha brezelioù fromuz o para e meur a stad

Dre hoar zadenn ar bugel  
Bamet dirag e gi  
Stoket gantañ e vuzell  
Plomm war beg e fri

Dre velkoni ar soudard nevez  
Trist o kuitaad e vestrez  
O lavar' evid e zoñj  
E timezo, echuet e goñje

Dre heol tomm miz Mae  
O hirraad an abardaez  
Dre èzenn yen ar goañv  
O skuba ar bodou lann

Dre noz ha deiz ar vuhez  
Dre ho merh leun a fumez  
Dre mil ha kant Sant  
Ho pedi a ran  
Santez Anna

Anne-Marie Maloney  
Gwengolo 84

### Merzerien Gastellbriant

Harp int ouz an oabl  
Eun tregont emaint harp ouz an oabl  
O buhez ganto peurvevet  
Saouzanet eo pep hini o selled ouz e skoaz  
A zo eur hastellad a garantez  
N'o-deus ket ezomm da lared an eil d'egile petra d'ober  
Peogwir biken ne vo mui a zisparti etrezo  
Unan anezo a zo o soñjal en eur vourh vihan  
Eno e oa bet er skol  
Unan all a zo ouz e daol  
E gamaraded krog ouz e zaou zorn  
Eet int dija euz ar vro zo 'n o spered  
Emaint pell-pell a-uz d'ar re-ze  
A zo o selled outo o vervel  
Euz ar re-ze beteg enno – keit hag ar verzerenti  
An avel he-deus c'hwezet hag e kanont  
N'o-deus keuz med euz eun dra: ne glev ket ar re  
A zo o vond d'o laha  
Trouz spontuz o homzou  
Digouezet int d'ar houlz  
Ha memez a-raog ar re all  
Koulskoude e laront n'int ket ebestel  
Hag eo èz peb tra  
Hag ez eo èz dreist peb tra mervel  
Peogwir e peurbad peb liberte.

**René Guy Cadou.**  
Brezoneg gand X.  
**(Le Pays Breton)**  
Miz du 1984

### Poent eo!

Al lezenn-diazez  
'Vid yez ar Vretoned,  
Al lezenn-diazez  
Afiez prometet,  
Pegoulz 'ta vo votet?  
'N em houl ar Vretoned.

Prometet en Oriant  
Gand 'n Aotrou Prezidant  
Hadprometet abaoe  
Gand meur a depute  
Med pegoulz vo votet?  
'N em houl ar Vretoned.

'Vel 'n danvezjou-lezenn  
Chomet war an dachenn  
Daoust d'ar promeseou  
Ha da doud ar strivou  
Ha dilezet e vo?  
'N em houler 'barz ar vro.

Tremen ra 'r vinstred:  
Heb chilaou 'r Vretoned:  
Fouchet, Beullac, Haby,  
Yann-Ber ha Savary,  
Ha n'eo ket bet votet  
'L lezenn ken esperet.

'N desped d'ar mennadou  
Kaset gand 'r Huzuliou  
Mud bepred chom Pariz  
'Vann 'bed d'on henvroiz...  
Ha n'eo ket bet votet  
'L lezenn ken esperet.

Hirie Ifig Dollo  
Esa kas 'n traou endro...

Med Destrade 'n em gontant  
Da heuill 'r gouarnamant.  
Pegoulz 'ta vo votet  
'L lezenn ken gortozet?

Ni ho ped, Prezidant,  
Larit dim ya pe nann,  
On henvroiz zo skuiz  
Gand troiellou Pariz.  
Hastit, hastit voti  
'L lezenn 'vid on yez-ni.

**Ar Stourmer**  
**(Le Combat)**  
(ar 24 a viz du 1984)

## Trihorn ar Bermudès

Hir-spontuz e vefe rei an niver euz ar batimañchou a zo eet digomprenuz da goll e « Trihorn ar Bermudès » abaoe m'en-deus diskouezet Christophe Colomb henchou ar béd nevez.

Ken hir all e vefe ivez klevet anioiu an oll girri-nij eet, er memez mod, e dour don ar Bermudès.

Kantvedou a zo anezo sur a-walh ha milierou a dud o-deus kollet eno o buhez hag o oll feadra.

E-pad bloaveziou eo chomet kuz ar gudenn-ze. Ne oa den ebed evid sevel e vouez da zisplega d'an oll an darvoudou kriz bet c'hoarvezet er mor milliget-se.

Evid lavaroud ar wirionez eo « Trihorn ar Bermudès » unan euz strafuilla divinadennoù ar hantvedou diweza.

« Mor an Ankou » - « Trihorn an Ankou » - « Trihorn an diaoul » a vez greet an alies a euz an toull daonet-se gand ar vorerien.

Peleh emañ 'ta ar mor-se a zo ken espar e stumm war kartenn ar béd?

Ma! war-zu ar sav-heol e heller lakaad « eur pik ledan » etre ar Bermudès hag an Açores. War-zu ar hreisteiz e vez gwelloc'h klask e rout etre ar Barbade hag an Antilles bihan. War-zu an norz e vez greet ano anezañ a-hed aochou ar Floride.

Eun Trihorn? Eur harrez? pe betra? Peseurt stumm eo? Den 'm-eus aon ne ouezfe hel lavared. P'en-doa tapet e vrud fall e oe greet « Trihorn ar Bermudès » gand kazetennerien 'zo. Lod a gav dezo eo ken divent e ehonder ma hellfe golei ar Mor Atlantel en e bez.

Abaoe pemp kantved d'an nebeuta e vez klevet ano euz ar haerra bagou, morerien a-zoare e-giz ar Vreudeur Gaspard ha Miguel Cortea en o bourz eet da beñseal, an eil war-lerh egile, en 1.500 ha 1.502.

Christophe Colomb, e-unan, en-deus dalhet soñj euz gouleier iskiz en-doa gwelet o troidella eston en noz tro-war-dro d'ar « Santa-Maria ». Kement all ivez a hoarvezas gand ar gonskited pa zeujont d'an avañtur Doue war e lerh en doare ma ouzom.

War-gresk eo eet brud fall ar mor-ze abaoe an deiz m'en-deus lakaet mab-den eul lestr da vond warnañ. E « Trihorn ar Bermudès » e seblant d'an oabl ha d'an dour beza a-du da vond a-eneb an dud...

War vor eh en em goll bagou ha martoloded. En oabl ez a da get ar hirri-nij. Dindan gorre an dour ez eus bet gwelet traou estlammuz, eur bamm selled outo. A-wechou e teu ar gorre da vourbouilla evel ma vije bet tommet dreist-muzul gand eur forn kuz. A-wechou ivez e vez gwelet o c'hoefivi spontuz e lehiou 'zo pa chom sioul ar peurrest euz an ehonder glaz-meurbed. Gwech an amzer e tarz dihortoz eur barrad amzer fall... Moged a zav a-greiz-oll diwar ar mor. An nadoziou-mor ken kizidig o jilgamm a zeu da bennfolli... Tud a-zoare, koulz war vor ha war an aochou, o-deus gwelet gouleier e-leiz oh elfenni sabatuuz en noz. Gwelet ez eus bet nevez 'zo pegen diêz e oa d'ar satellitou diougan-amzer luhskeudenni an trihorn-ze.

Kement-se a zo a-walh evid diskouez splann e c'hoarvez darvoudou kevrinuz er mor-se.

Ya, darvoudou kevrinuz ha kriz a zo, eur bern anezo. Etre 1.800 ha 1.977 ez eus bet eur hant hag hanter-kant bennag a vatimañchou kollet en « trihorn ». Bagou a beb seurt, a beb ment hag a beb bro. Listri brezel teo an houarn warno koulz ha bagouigou-dre-lien. En o mesk e heller ober ano euz eul lestr-spluj amerikan bet kollet e 1.968. Ar « Scorpion » a veze greet anezañ.

Kelou ebed ken euz an darn-vuia anezo war-lerh o feñse. Edo Sata-naz o firbouchal tro-war-dro dezo, kredabl.

Na souezuz! Eun nebeudig anezo a zo bet adkavet o verdei bravig o-unan-penn, eet o lestrad martoloded kuit diouto e-kreiz ar mor don. Ne chome war o lerh nemed loened ar vatimant du gand an naon.

E berr-gomzou, e heller rei eur reolenn euz ar batimañchou dilezet eston er mod-ze gand peb tra en e blas er vourz. En urz vad e veze ar goueliou ha brao an avel enno.

1.840: eul lestr gall « La Rosalie ». Ne chome war e vourz nemed eur haz, eun nebeud yer hag ar seran.

1.850: eul lestr amerikan « The sea-bird » (« Al labous-mor »), deuet didud war ar seh en « Easton Beach ».

1.855: Eur vatimant vraz, teir gwern dezi.

1.872: eur vag amerikan: « The Mary Celeste ». (Eur skwer eo ar vatimant-se evid ar pez a zell ouz seurt kavadennoù).

1.881: Diano. Kavet eo bet dilezet ha didud e-tal an Açores gand eur vag all, an « Ellen Austin » heh ano. Mond a reas diwar-wel an Ellen Austin e-doug beaj an distro. Kelou ebed goude diouz ar vartoloded bet lakaet warni d'he sturia.

1.884: « Resolven ». Kavet eo bet he goueliou ganti digor. Edo ar gouleier war elum.

1.902: Eul lestr alaman.

1.921: Eul lestr amerikan. Pemp gwern dezañ. Kavet eo bet dilezet war ar seh e Beg Hatteras. Kelou ebed ken euz al lestrad martoloded.

1.932: Eur vag amerikan dre-lien « John and Mary ». Dilezet e vije bet war-lerh eun darzadenn.

1.935: Eur vag amerikan dre-lien « Dahama ». Dilezet e vije bet gand ar vartoloded war-lerh eun taol-amev. Kelou ebed ken diouz ar vartoloded evel just.

1.940: Eul lestr saoz, « Gloria Colita ». Kavet goulo e pleg-mor ar Mexique.

1.944: Eur vatimant kuban. Ne chome nemed ar hi war he bourz.

1.946: « City-Belle ». kavet eo bet e-tal Miami.

1.948: « Wild Goose ». Kollet war hent an distro. Sachet e oa gand eul lestr all pa'z eas a-ziwar-wel diwarnañ. Bez' e oa pevar den en e vourz.

1.955: « Connemara IV ».

1.969: Diano. Mond a ree iskiz troet war e henou. Daou all diano. « Southern Cross ».

1.971: Eur vag pesketa, « Lucky Edur ».

1.973: Eur vag dre-lien, « Defence » heh ano. Eun all diano.

E-mesk an darvoudou misterius-se ez eus unan a zo brudetoh eged ar re all oll asamblez. Istor ar « Mary Celeste » an hini eo.

Ar vag dre-lien-ze, teir gwern dezi, a zo bet savet e 1.861 er Hanada. Eur vag goñvers e oa. « The Amazone » a oe greet anezi pa oe moraet. Ne oa ket eur vatimant gwall-chañsuz. Ar habiten a varvas eun nebeud deveziou war-lerh he badiziant. E-doug he beaj kenta e oe kentraouet taer gand eur vatimant all ha dre ma oa oh ober war he zro e krogas an tan enni. E 1.863 e treuzas ar mor Atlantel evid ar wech kenta. Edo o verdei e-kreiz Mor-Breiz pa gentraouas eul lestr all. Ken taer e oe an taol ma vrallas he oll frammadur ha ma oe kaset an hini all d'ar foñs. Chom a reas heh-unan war-vor, frigaset an darn-vuia diouti. Red e oe heh adaoza penn-da-benn evid an drede gwech.

Ar vartoloded ne blij ket dezo listri a zo kouezet eur blanedenn fall warno. Gwerzet e oe neuze. Ar « Mary Celeste » a oe greet anezañ diwar ar houlez-se. Seblant eur wall-blanedenn a oa warnañ hag en desped d'e ano nevez, e nahas meur a vartolod advora gantañ.

D'ar 5 a viz du 1.872 e kuitas ar vatimant kêr New-York evid mond war-zu Bro-Italia evid kenwerzi gwin-ardant e Genoa. Bez' e oa 11 a dud en he bourz. Ar habiten Briggs, e wreg hag o merhig oadet a zaou vloaz hag 8 den a vor ampart. Ar habiten a oa eur maout war e vicher, eun den troet e spered gand ar relijion. En e gambrig-lestr e oa ograou bihan evid kana meuleudi da Zoue.

Eur miz goude beza kuitaet New-York, hanter-hent etre an Açores hag ar Portugal, e oe gwelet gand eur vatimant all. Mond a ree ar « Mary Celeste » eun tammig eston gand he hent. An « Dei Gratia » a oa ar vag all. En he fenn e oa ar habiten Moorhouse, unan euz gwella keneiled ar habiten Briggs. Henez a chomas e henou war nav eur pa welas pegen iskiz ez ee lestr e vignon. Aroueziou galv a gasas davetañ. Respont ebed! Buan e reas neuze e zoñj kas eur vagig da glask kelou digand e gamalad. Alvaonet-braz e chomas ar moraer pa glevas kavadennoù ar vartoloded...

- Ne oa den ebed ken e bourz ar Mary Celeste.
- Ar vagig savetein a oa eet kuit.
- Ar goueliou braz a oa e stad vad.
- Netra ne vanke el lestrad marhadourez.
- Gwerenn an nadoz-vor a oa torret.
- Kambrig ar habiten a oa prennet. Plankennoù koad a oa tached war ar prenestr.
- Bez' e oa dour-mor er strad, med ne oa ket an dra-ze evid beza riskluz an disterra.

- Ar riboulou flistra a yee mad endro.
- Tra-walh a voued hag a zour a oa evid c'hweh miz.
- Traou personel an dud a oa renket brao en o flas.
- Ne ree diouer d'al lestr nemed ar binviou beaji.
- Pred diweza famil ar habiten a oa chomet war an daol.
- Bez' e oa daou verk don war ar houh e-kichenn al linenn-zour.
- Bez' e oa eur bouh don bet greet gand eur vouhal war ar speurenn.
- Bez' e oa takennou gwad kozig a-walh war ar pont ha war kleze ar habiten.
- Deiz diweza levr ar vatimant a oa chomet a-zav 8 devez a-raog ar gavadenn vor. War-eeun e oa eet ar Mary Celeste gand he hent 1.000 km pelloh.

Ar habiten Moorhouse a lestras eun nebeud tud e bourz ar vatimant hag ez eas ganti war-zu ar Portugal. Goude hir-enklask ne oe ket posubl d'an dud a lezenn kavoud ar wirionez diwar-benn an darvoud. Eur hevrin e chomas evito. Roet e oe eun arhobr a-zoare d'an « Dei Gratia » war-zigarez m'he-doa saveteet ar varhadourez.

Istor ar « Mary Celeste » eo an hini kevrinusa bet c'hoarvezet war vor. Med traou ken souezuz all 'zo. Merkoud a heller koulskoude ne chom didud nemed ar bagou kenwerz. Morse n'eus bet greet ano euz eur vatimant a vrezel bet dilezet gand he lestrad tud. Meur a hini anezo n'o-deus ket gwelet dibenn o beaj hag a zo eet d'ar strad eun tu bennag e « Trihorn an Diaoul ».

E 1.951, al lestr houarnwisket « Sao Paulo », bet savet er Brezil a zo en em zanket a-greiz-oll en dour tra ma oa daou all o sacha mord warnañ. Ken digomprenuz hag istor ar « Mary Celeste » e chomas hini ar « Sao Paulo ». Skweriou all e-leiz a hellfed rei er mod-se ha berrig a-walh em-eus komzet euz ar pezh a zo erruet e « Trihorn ar Bermudès » e-skoaz ar pezh a chom c'hoaz da gonta diwar e benn.

Levriou, filmou, eur ganaouenn... a zo bet savet diwar-benn an « Trihorn ».

Traou iskiz-kenañ evid batimañchou 'zo. N'eo ket ar peurrest euz an dour sall evid lavaroud kemend-all deom. Ar moriou all a zo « normal » o darvoudou kriz gand o lodennad kontadennou, korc'hweziou braz...

E « Trihorn an Ankou » emañ 'ta krizder ar mor en e wasa.

Lavaret em-eus dija en-doa gwelet Christophe Colomb hag an alouberien deuet da firbouchal war e lersh, gouleier espar e-pad an noz. Re hir e vefe ivez rei al listenn glok euz an testeniou bet enrollet en eun doare ofisiel a-hed ar hantvedou eet e-biou abaoe diskuliadeg an Trihorn. Oll e kontont ar memez traou. « Gouleier estrañj o liou e-pad an noz, koulz en neñv, war vor ha dindan gorre sioul an dour. A-wechou e tifloupont ken buan hag eul luhedenn. Gwechou all e chomont a-za a-uz d'an douar braz. Gwech pe wech e splujont er mor e leh ma heller miroud ar gwel anezo e-pad hir-amzer.»

E 1.952 e oa niver an testeniou-ze en o brud brasa. « O.V.N.Iou » e-leiz a oa bet gwelet o nijal en « oabl an Trihorn ». Eur bern anezo a oe gwelet o troidella forz pegement dreist an Ti-gwenn e Washington. Prest e oa, sañset, ar « Varserien » da aloubi on paour-kêz planedenn! Kaset e oe kirri-nij a vrezel war o lersh. Ar radar a zo lemm e lagad. Dont a reas a-benn da jedonia tizder ar skudellou-nij. Ne oa ket ar skiantourien evid kredi o reolenn da jedi! War-dro 12.000 km/eur ez eent... « Karrigellerez Washington » a oe greet euz an darvoud strafuilluz-se. Gouzoud a reer e vez greet goap euz ar re o-deus gwelet « eur plad-nij bennag » en oabl. Ne vez ket an dud evid dihoarzin pa glevont seurt traou. Med ar wech-mañ e oa an testeniou euz an dibab. Soudarded a renk uhel, kosmonoted, archerien, skiantourien, an oll a oa akord evid ober o seiz gwella war an disklêriaduriou nevez-se. Ken siriuz e teuas ar gudenn da veza ma savas gouarnamañchou 'zo studiou ispisial diwar-benn an « O.V.N.Iou ».

Kuz a-walh e chome an diskoulm. Bewech ma felle da unan bennag mond pelloh war an dachenn-ze e veze respontet dezañ moustra war e hoant gouzoud pe chom er-mêz euz an afer. Kazetennerien 'zo a zo bet kaset da zutal. Er Stadou-Unanet, war a lavarer, e vez divennet groñs d'an avionourien ober ano euz ar skudellou-nij. Eur bern anezo, koulskoude, o-deus laret e oant bet taget gand meur a « O.V.N.I. ». Paperennoù kuz diwar-benn an traou-ze a zo bet savet ha lavaret 'z eus bet e oa ar « C.I.A. » oh ober ged tro-war-dro d'ar ministeriou karget euz ar gudenn-ze. Hag ar seurt-se ne vez ket brao mond da glask tabut outo.

Iskizoh c'hoaz! Hervez ar pezh a zo bet klevet gand « tud hir o skiant » e oa « tud deuet euz eur béd all » hag a fellfe dezo laza didruez ar re o-doa lakaet hir o fri er zoubenn-ze! « Ar baotred gwisket e du, mele-

nig o dremm hag hirgelhieg o hloppenn » a vez greet euz an archerien nevez-se deuet euz an tu all d'ar stered!

N'emañ ket an oll furcherien a-du war ar poent-se. « Koz-Noe e vefe seurt paotred » a lavar lod. « Kant mil vloaz d'an nebeuta. Keid emañ diouzom ar steredenn genta ma ne vije den ebed gouest da houzañv eur seurt beaj.»

« Setu perag e teu ar baotred-ze euz on douar-ni » a respont dicheg ar re all. « Ar re-mañ o-deus kavet eur goudour a-zoare e foñs ar mor.»

Peadra da sponta 'zo ha mantret braz e chomer pa glever, dre ar munud, ar pez en em gav ivez a-uz d'ar mor e « Trihorn an Diaoul ». Rag ma'z eus traou spouronuz war vor, ez eus kemend-all en neñv.

Etre 1.931 ha 1.977, m'am-eus soñj mad, ez eus bet war-dro deg ha tri-ugenta a girri-nij bet kollet en oabl.

Menegi a heller eur harr-nij braz kouezet digomprenuz er mor evel ma vije bet sachet gantañ. Eur bern tud, dispourbellet o daoulagad, o-deus gwelet an darvoud. Edo ar vatimant amerikan « R.V. Discoverer » o verdei er horn-ze euz an « Trihorn ». Goude ma oa bet kollet, pa yeas ar vartoloded da glask eur roud bennag euz ar peñse, ne gavjont nemed korv dibennet eun ejenn skornet o neu war an dour. Ken sklêr ha melezeur eur feunteun e oa ar mor tro-war-dro dezo.

Ne heller ket, a-hend-all, chom heb menegi ivez « Kudenn vantruz an 19ved Nijadenn ». Ken brudet hag hini ar « Mary Celeste » eo an afer misterius-se.

Eun tammig amzer war-lerh ar brezel diweza e oe kaset pemp karr-nij amerikan da ober an neuz da vombardi an enezenn Vinimi e « Trihorn ar Bermudès ». Ezomm oa euz 15 a vlenierien evid kas da benn ar gefridi ordinal-ze. Daou anezo a houlennas krak-ha-berr chom heb mond. Ne oe aotreet da chom nemed unan war zigarez en-doa bet e lodenn eurveziou-nij. 14 a dud 'ta o-deus kemeret perz en 19ved nijadenn. Avionourien a-zoare oant. Eun tamm mad a skiant-prenet o-doa paket e-doug ar brezel.

Edo ar pemp karr-nij o vond gand o hent pa zavas mouez ankeniet o homandant e binviou-selaou paotred an douar-braz:

—« Kollet eo an hent ganeom! Kollet eo an hent ganeom! Eet eo an douar hag ar mor a-ziwar-wel diouzom!»

Ne oa ket paotred an douar-braz evid kredi ar pez a glevant.

—« Peleh emañ?» a houlennjont.

—« N'ouzom ket peleh emañ na da beleh emañ o vond. Emañ an nadoziou-mor o sodi.»

— « It war-zu ar huz-heol », a lavaras dezo paotred an douar-braz.

—« N'eus den ebed e bourz or harr-nij evid lavaroud peleh emañ ar huz-heol. N'emañ ket ar mor en e vleud. Kavoud a ra deom emañ o tiskenn en douriou ken gwenn hag al lêz. Kollet om! Kollet om!»

Grig ebed ken goude.

War-lerh an avañtur-ze e oe roet da anavezoud e oa bet klevet radio an 19ved nijadenn gand eur harr-nij all. Med pa fellas d'ar blenier mond daveti evid o sikouri e oe respontet krak-ha-berr dezañ:

—« Bremañ eh ouzom peleh emañ. Na deuit ket davedom gand ma reoh.»

Drol a-walh eo ar respont-se euz perz eur paotr hag a oa oh en em goll eun nebeudig munutennou a-raog. Digoret e oe eun enklask evel just. Diskouezet he-deus o-doa spurmantet meur a vlenier karr-nij « eun dra bennag » en neñv e leh ma oa eet da netra an 19ved nijadenn.

Pa zeuas gwreg unan euz an avionourien gollet da glask kelou, ne gavas nemed bureviou prenet mad. « Echu eo an enklask », a oe respontet dezi. Eur youl divent a vage ar paour-kêz maouez. Dre forz firbouchal war-dro an dud karget euz an afer e teuas da houzañv ne oa « ar gouleier iskiz » bet gwelet gand « tud 'zo » e-pad noz an darvoud nemed gouleier lamp eur pesketour noz a oa o chaseal ar raned war palud an aod.

Ne oa ket an intañvez evid kana seurt gousperou. A-benn ar fin e oe damlaret dezi e oa kuz an afer ha ne oa ket posubl mond pelloc'h war an dachenn-ze. Re a sparliou a oa bet lakaet war hent ar wirionez.

Peseurt sklêrijenn a zo bet digaset diwar-benn an traou estlammuz-

se? Diêz gouzoud. Ar gouarnamañchou a zo mud war ar gudenn ispisial-ze.

Evid peb batimant, peb karr-nij, eet da goll, ez eus eun digarez a-zoare evid sioullaad spered an dud.

Ar Rusianed, marteze, a zo hirroh o ijin war an « trihorn ». Skrivet o-deus e teuje an amzer fall da brodui trouziou ispisial e « mor ar Bermudès ». Pa vez lakaet eun ton 6 mghz uhelder da vond endro e teu an dud da zodi gantañ a-benn eun nebeud munutennoù. Pa vez arneviou mor e-leiz ez eus ivez toniou er mod-se en o mesk. Hag arneviou 'zo en « Trihorn » evel just. Ganto, sañset, e vije bet lakaet ar voraerien hag ar vlenierien da goll o fenn beteg lakaad anezo da zilezel o batimant pe o harr-nij.

Hervez ar Rusianed atao e vije stumm an douar eun tammig ispisial e lehiou 'zo. Kiriég e vefe ar stumm espar-ze euz ar chañchamañchou braz a heller merzoud koulz e pouez an êr ha magnetierez ar béd. Pa vez lakaet an daou dra-ze da gemma taer asamblez, e teu an avel da zirolli.

Lod all o-deus laret ez eus avelioud fall a-uz d'ar houmoul uhella. Setu pezh a lakfe êzennoù koz Noe bet miret dindan foñs ar mor da glogorenni spontuz war gorre an dour. Pa darzfe eur glogorenn dre-zindan eur vatimant bennag e teuzfe reolenn goz Archimede da hwita war he galloud.

Klevet ez eus bet ivez, nevez 'zo, e hellfe an dour hag an êr cheñch o fetister e « lehiou 'zo » pa hoarvez « darvoudou fizik » dianavezet gand ar skiantourien. O veza ma'z eo bet jedoniet al listri hag an avio-nou gand eur fetister deread n'int ket evid gouzañv kement-se a chañchamanchou. Setu perag e yafent da goll.

Med, ma'z eus tud hag a fell dezo kavoud digareziou skiantel evid displega kevren « Trihorn ar Bermudès » ez eus ivez tud all sanket don en o zoñj emañ « alhwez ar gudenn » e foñs an dour don.

« Tud 'zo o veva eno. Dindan ar mor ez eus eun enezenn vraz eet da get kantvedou 'zo. „An Atlañtid“ a veze greet anezi ha n'om ket evid padoud kent kavoud defot anezi endro.»

Hervez ar vojenn e vefe an Atlañtid eun enezenn ken koz hag ar béd bet lonket gand ar mor abaoe meur a gantved. An hini kenta oh ober ano anezi eo Platoñ. Menegi a ra siriuz diouti e-barz daou levr deuet da veza brudet braz dre ar béd a-bez : « An Timee » hag ar « Critas ».

E berr-gomzou e heller lavaroud e vefe bet eun douar braz hag eun nebeud enezennoù tro-war-dro dezañ e-tal aochou ar Portugal.

Atlantis a oa, sañset, kêriadenn veur an oll vroioù-ze. Meur a zavadur braz ha kaer a oa ren en o hreiz. Roueou fur ar broioù-ze a vefe deuet a-benn da zével rouanteleziou braz brao-kenañ ar sevenadur enno. Edo Atlantis oh astenn he splannder war ar béd a-bez.

Meur a skrivagner hir o ijin o-deus lakaet an Atlantid eun tammig e peb leh, pep hini hervez e skiant pe e faltazi. Diêz-tre eo 'ta gouzoud peleh e vefe ar rouantelezh kosa euz ar béd enni mammenn peb sevenadur.

Dre forz prederia e teuas ar sklêrijenn d'eur Jezudad, Atanaz Kircher e ano. An tad santel-mañ a zisklêrias e oa an Açores hag an enezennoù Canaries ar begou uhella euz an douar braz-se bet goloet gand an dour abaoe eur mor a gantvedou.

Meur a skiantour o-deus lakaet o ijin da vond endro war-lerh an tad Atanaz. El labour metaliou, en arkeologiez, er yezoniezh, e kement tra a zelle ouz sevenadur mab-den, ez eus bet tud o furchal beteg ma oe anad e oa ar wirionezh gand an tad Kircher.

N'eo ket don ar mor war-dro ar Bahamas. Kavet ez eus bet eur voger nepell dindan ar gorre. E berr-amzer e teuas ar skiantourien da broui e oa bet savet gand dorn an den. Lod a asur ez eus mein-hir ha taoliou-mein e-leiz dindan ar mor. Lavaret ez eus bet e oa eul liamm resiz-tre etre krommlezh Stonehenge ha « Trihorn ar Bermudès ».

Aheliou ar hrommlehiou a ziskouezfe deom « mammenn an uranium » a lavar furcherien 'zo.

Klevet ez eus bet ivez mouezioù o tond euz foñs ar mor e « Trihorn an Ankou », « Mouez an Atlantid » an hini eo, a gav d'ar memez furcherien. Ha dre ma'z ee an amzer endro ez ee eston war greski niver ar batimañchou hag ar hirri-nij kollet hag e veze gwelet ivez

muioh mui « Ovniou » en eur horn bennag euz « Mor an Diaoul ».

En or mesk ez eus tud hag a gav dezo emañ an Atlanted, o-unan, o vlenia ar skudellou-nij. Brezel a reont ouz kement hini en-deus desket eun dra bennag diwar o houst.

Lezel a rin ahanoh da gloza hoh-unan ma fell deoh kenderhel gand an enklask diwar-benn « Trihorn ar Bermudès ».

Evidon-me e kavfen plijuz-murbed gweled ar Roue Gradlon e-unan a-haoliad war eun O.P.N.I (1) nevez-flamm deuet endro euz Kêr-Iz (on Atlañtid deom-ni) da glask tabut ouz ar re ne fell ket dezo lakaad ar brezoneg da vond endro.

Chase vad a hetfen dezañ a-greiz-kalon!

**J.C. Miossec**

(1) O.P.N.I.: Objet Plongeant Non Identifié, e galleg.

**Youenn Brusk**  
**Eun haykou bennag**

Barzonegou  
Tresadennoù gand an oberour e-unan

Priz: 40 lur.

## Eul loen hudur

Den ne oar mad a-walh euz a beleh e teu. Gour ebed kennebeud ne oar gweloh da beleh ez a. Tremen a ra e vuhez, par d'eun ermit, sioulig ha didrouz en eul leh dizro, heb an disterra kompagnunez. Ral ar wech gweled ar skeud anezañ ha koulskoude rouez eo an dud n'o-defe ket anaoudegez outañ rag dond a ra aliez e gaoz war-horre en abeg d'ar gwall vrud eo e hini. E diavêz-se, n'eo ket dîêz e peb doare anavezoud al loen diouz an anevaled all. Tenna a ra, dre e gorvegez, d'eur gurlaz, nemed ez eo peurvuia eun tamm bennag brasoh. Liou an huzil a zo war e grohenn, gand takadou melen ivez ouspenn amañ hag a-hont. Glaou hag aour eta. E-giz dorjoù an ivern.

Hir ha moan evel eur gurlaz, ya, med pa stag da gerzed e chomer souezet o weled pegen gorreg ha tuzumeg eo al loen. A-veh ma hell stleja e gory a-ruz e gov war e baoiou berr. C'hoarvezoud a ra gantañ, evel an avalaouer, beza friket gand rod eun oto bennag pa gred en em avañturi war an henchou braz. N'eo ket beb sul, evelato, ez a da bourmen evel-se. Troetoh eo da jom er gêr, kufunet en e doullig, e korv eur pilgos brein pe dindan eur gwiskad stonn e strad eur foz. E-keñver al lojeiz n'heller ket tamall anezañ da veza eur beg figuz. Forz peseurt kornig dizarempred a vo deut mad dezañ gand ma kavo ennañ freskadurez ha teñvaljenn.

Arabad, evelkent, fizioud re er Yannig e-unan-ze. Eun tamm brao a abostol a zo euz ar penitiour kluchet aze en e logell. Da sponta an dud n'ez eus ket gwasoh egetañ. Selaouit.

**1928:** Eet e oa dija pellig ar skolaer gand ar gentel « skweriou mad » – hini genta an devez, evel beb mintin – pa skoas va dorn war dor an ti-skol, va halon o traskal. Tapet e oan diwezad, hag edon, anad eo, o vond da glevet va fater.

War hent ar skol, en eur horn-tro, e oan kouezet a-daol-krenn war loen an diaoul. Eur barr glao en noz e-noa greet dezañ en em zispaka, hag edo an amprevan aze bremañ, astennet war hed eur rahouenn hanter etre an diou rolleh-karr. Prest da zailla, rag edo o vond da lam-mad warnon; re zur e oan euz kement-se. Sklêr va setañs. Ped ha ped all arazon-me ne oant ket bet douget d'ar vered, faoutet dezo o fenn gand eun taol lost!

Eur predig e chomas ar mousig bihan oa ahanon seizet, stag e dreid ouz an douar; med kerkent ha ma reas an euzvil eur fiñvadennig, ar paotr a drohas hent evel eur marh dall, an tan war e voutou. Beteg eun toull-ode dre al leh ma hellas tehoud en eur waremm lann ha kavoud e alan endro a-raog soñjal dre beseurt gwenojenn e hellje bre-mañ tizoud ar vourh.

Ar mestr-skol, eun taol-chañs eo, a ziskouezas beza madelezuz. Dond a reas a-benn da gompren heb re a boan, a-dreuz va balbouz, an darvoud c'hoarvezet ganin, hag e kemennas din, heb an disterra rustoni en e vouez, mond da azeza:

—« Il ne fallait pas, emezañ, avoir si peur d'une "salamandre". »

Ar henta gwech oa din kleved ar ger-ze. « Sourd » eo an ano a reen-me gantañ evid eñvel al loan-droug a oa o paouez beza penn-kaoz d'am strafuill. Hini all ebed, beteg neuze, n'e-noa bet skoet va skouarn.

\*  
\*\*

Ar ger-ze hag eur boaz d'ober gantañ e brezoneg a dle, sur a-walh, dond war-eeun euz ar galleg, nemed ez eo bet brezonekaet an distaga-dur anezañ (an *s* o vond da *z* e lehiou a zo, war-lerh ar ger-mell dreist-oll: *ar zourd*; hag an *d* o veza distaget reudig bepred e dibenn ar ger). An ano-ze eo an hini a dalvez evid *salamandre* e kalz toleadou a zo e Bro-Hall, moarvad dre ma kred d'an dud ez eo bouzar al loen. E Breiz, kenkouls all, e vez kavet ar hrenn-lavar-mañ:

« M'en-divije klevet ar sourd ha gwelet ar ho(z)

Ne vije padet den e-barz ar vro.»

Ha daoust ha ne leverer ket kennebeud euz eun den bouzar-pod pe bouzar-kloh ez eo ivez *bouzar-sourd*? Hogen, kement-se ne zigas ket deom an diskoulm. Taolom eur zell war ar geriadurion.

E-barz geriadur Gregor Rostren (1732) ne gaver nemed ar ger *sala-*

*mandra*. *Sort* eo an hini a ginnig deom Troude (1876) ha Du Rusquec (1886); hogen, e geriadur Ernault (1927) e heller lenn *parlafan* (gand ar meneg-mañ: Ouessant). Kemend all e hini Vallée (1931) e-kichenn *salamandra* hag ivez *sourd*. Daoust ha ne hellfe ket, eta, *parlafan* beza ar gwir ano e brezoneg, eet hirio an deiz an implij anezañ da goll dre oll nemed en Enez-Eusa e ve? Troiou-lavar a zo hag a denn d'ar ger-ze a-dost a-walh: *mond war e barlafanou* da skwer, eur poz-komz o talvezoud, hervez Ar Gonideg (geriadur 1850) kement ha *bale war e barlochou* (war e grabanou), ar pez ne zere ket fall emi-chañs ouz ar sourd pa gerz, brall-divrall, war e dreid krapog.

Da bep hini d'ober e zibab. *Salamandra, sort, sourd, pe parlafan*, ingal a-walh eo peogwir e oar an oll piou eo al lastez-loan. N'eo na chaog na stran a ra diouer diwar e benn! Hervez al *Larousse* e-neus an urupaill ma'z eo, ar galloud da dreuzi an tan evel eur pesk en dour. Gwasoh zoken: kredi a veze greet gwechall e helle ivez eun den tremen dre an tan, heb d'fêzant, war-bouez dezañ kaoud warnañ eun tamm dillad bennag bet taraset gand gwad eur sourd. Stlapet e-kreiz eur baillad glaou beo ar paotr a jome dinamm kaer, ha flour e gröhenn warnañ. Kaerroh c'hoaz. Pa daoler eur sourd e-barz an tan, ar hast en em lak da gana! Setu aze, moarvad, ar hredennou a zougas Frañsez 1a da gemer ar sourd da arouez. Emañ al loen e-touez ardameziou ar roue war siminaliou ha diri meur kastell kêr Blois, an tan dindan e dreid ha flamennou hir o tifulka diouz e henou, eur bomm latin kizellet e-kichenn: « Nutrisco et extinguo » (e vaga hag e vouga a ran). Arabad koll ar zoñj e veve, d'ar houls-se, eul lodenn vad euz Europa dindan levezon eur spered uhel a zen: Paracelse, eur medisin braz o chom e Bro-Suis; eur mestr-prederour anezañ ivez, doujet gand e gempredidi ha brudet evid ar ouiziegezh oa e hini war an alkimiezh, unan euz ar skiantou ma pleustre warno des-keta tud an amzer-ze. Tizoud kalon an tan, mond beteg ar vouedenn anezañ, en eur ger, laerez digantañ ar sekred kuzet en e greiz, setu ar pez a glaske an alkimisted dond a-benn da ober en eur labourad war danvezioù a beb seurt, ar soufr, hervezo, o veza an hini bouezusa anezo. Med dres, petra 'ta oa arouez an tan ma n'eo ket ar sourd an hini eo, ar *salamandra* dezi liou ar soufr hag al ludu, gouest da enebi outañ ha da veza, pa gar, treh warnañ.

Chomet eo evel-se e-pad pell ar sourd hag an tan da veza kerent tost an eil d'egile, an testeni gwella o veza an ano bet roet e galleg (*salamandre*), tostig a-walh deom, d'eur fornigell-hlaou a dalveze d'ar vourhizien, ergentaou, da domma o hambreier.

Peadra a zo, evelato, da veza alvaonet pa weler pegen izel eo kouezet hirio an deiz ar sourd, eñ hag a zo bet pignet beteg an uhella pazenn e skeul an enoriou. Marteze eo c'hoarvezet ar gwall giladenn-ze dre ma n'o-deus ket skiantourien or hantvedou-ni c'hoanteet derhel da roudou o diagentidi. Tamallet zo bet alfez d'ar re-mañ beza enno natur sorserien, beza outo pennou diboell troet da zarempredi an droug-spererjou, pa n'eo ket an Diaoul e-unan an hini eo! Dao a-walh eo bet d'ar sourd heulia planedenn e vistri. Goude dezañ beza bet douget beteg daez ar roueed, setu-eñ stlapet e toull flêriuz an euzviled. Evel an êl koant, diskaret diouz lein an Neñv pa hoantas dezañ kaoud ivinou.

N'eo ket skubet kuit c'hoaz, ha pell ahano, ar brizkredennou o tena d'ar sourd. Gregor Rostren a lavare ez eo ar sourd, – *salamandra* emezañ – eur *seurt glazard pe sar pant bihan, gouest da veza, eur pennadig amzer, e-barz an tan*. N'emedo ket ar wirionez rik gantañ, n'eo ket braz avad kennebeud ar gaou a ree. Ar sourd e vez atao damhlebe e grohenn, hag an dourenn hludeneg o sevel warnañ a ro d'al loen ar galloud da enebi, eur momed, ouz flammou eun tan ha n'eo ket re loskuz. E korn-broiou 'zo e talher da eñvel ar sourd *aneval an tan*. E Pluskelleg, da skwer; rag kredi a reer du-ze e hell al loen derhel penn d'an tan keit ha ma kar. Bez' e reer ivez outañ *loen an diaoul* (Landivizio), pe c'hoaz *loen an ivern* (Konk-Leon). Lavaret e vez e hell eur sklêrijenn tarza dioutañ e-kreiz an noz (Porspoder, An Arhantel) hag e plij dezañ tostaad ouz kement tantad a zigouez war-wel dezañ (Plouzane).

Ne vefe ket dîez menegi amañ anoïou eur strobard mad a barrezioù all e leh m'e-neus ar sourd ar brud da herzel ouz an tan. E-ser tremen-distremen amañ hag a-hont a-dreuz ar pastell-bro a zo en tu-mañ da Gemperle ha Sant-Brieg em-eus niveret ouzpenn tri-ugent anezo, ha pell emañ, sur on, ar roll da veza klok.

Beza treh war an tan! Eur brud avîuz, ya 'vad. N'eo ket hennez, evelato, ar brud nemetañ a ra d'ar sourd beza eul loen dreist-reol. Eur hagn divalo a zo outañ ivez, gouest da ober mil droug d'ar paour-kêz. Setu aze an tu gin euz ar vedalenn. Ha d'ar henta poent, binim a zo gantañ a leverer. Ar pezh a hellfe, posubl a-walh, beza hanter-wir pa weler pegement a zisfiz o-deus outañ ar chas koz tapet ganto o furnez. Soñj e talh bepred ar re-mañ da veza bet gwanet diwar e goust pa oant yaouank, pennou brell ma oant. Emañ c'hoaz hirio war o staon blaz doñjeruz ar hlaourenn a eonenne en o genou p'o-

deveze mandrouillet re bell ar viltañs du e gwask o dent. Anad eo ne deu ket an heug-ze diwar netra. Ar pezh a zo sur eo e kaver war grohenn ar sourd eur gwiskad toullou bihan-bihan, ha pa groger da heskina an aneval, dre an toullouigou-ze e strill eun dourenn damheñvel ouz an dour-lêz a red diouz gwriziou ar c'hwervizon. Tud 'zo a lavar ez eo an dourenn-ze eur hontamm, ha zoken, toui a ra lod euz ar re-mañ ez eo ar sourd loen a-walh da strinka ar binim-ze beteg daoulagad an dud gand eur staotadenn hir; ar pezh a damaller ivez d'an touseg ober pa zav fulor ennañ (Lanildud, Sant-Pabu, Gwipavaz, Landerne, Lezneven, Terug, Kast, Brieg, Brehand...).

Hogen, m'o-deus aon darn ahanom ouz an ampoezion a red diouz ar sourd, nehetoñ ez int c'hoaz kenkaz e pegfe enno ar galkenn ma'z eo. Peadra da veza skoet war an taol gand ar maro!

Red eo, ma sank an orin e zent en ho krohenn, leuskel gantañ eun tamm kig da vond kuit (Kameled, Pleherel), pe dond a rafêh a-benn, da nebeuta, d'ober dezañ diskregi. Ar pezh n'eo ket êz... Ne houzañv distarda e javedou nemed lakeet e vefe dezañ eun tamm houarn ruz en e henou (Plouigno), pe war e benn (Laz, Brenniliz, Pluskelleg), pe war e gein (Lanveog, Skrignag), pe c'hoaz – ar pezh a zeblant beza efedusoh – war e lost. Perag war e lost? Abalamour, aze e-barz al lost eo emañ kuzet kalon al loen! Niveruz-kenañ eo ar parrezioù all ma roer enno aliou damheñvel evid en em zizober diouz an hinkin daonet (Gwipavaz, Kraozon, Plodiern, Ar Hastell-Nevez, Speied, Gwezeg, Sant-Toz, Sant-Ivi, an Uhelgoad...). Brasoh chañs a zo c'hoaz da zond a-benn outañ pa hell an tamm houarn beza ruziet e govell eur marichal (Brenniliz), ha dreist-oll gand glaou-koad ouzpenn (Koloreg).

Tro a zo ivez da ziarbenn ar sourd war-bouez kinnig dezañ eur melezeour (Lannedern, Langolen, Koloreg, Sant-Wazeg). Kalz buanoh zoken e kaser, evel-se, an taol da benn, ha n'eus doare all ebed d'en em gemer, estreged hennez, mar deo eet al loen, siwaz, a-bez e-barz ar hig-beo (An Uhelgoad). Trelatet ma'z eo o kredi gweled e-barz ar melezeour skeudenn unan euz e genvreudeur, al lank, raktal, a ra eul lamm er-mêz dre henou an den spouronet.

N'eus netra ebed dañjerusoh eged chom da zelled ouz eur sourd. En eul lamm emañ warnoh. Ha setu toullet ho taoulagad (Brest, An Drenneg) dichafantet ho fri (Plonevez-Moedeg), displantet ho pleo (Plouvien); nemed skoet e vefe bet war an taol gand ar maro (Lan-

urvan, Berrien, Skrignag). Ma tale ho sellou war takadou du al loen emaoñ war var da goueza dall (Plodiern), ha ma taleont war an tam-mou melen anezañ, e savo ivez takadou melen war ho krohenn. Gwasoh c'hoaz: emaoñ en riskl da dapoud kleñved ar melennadur (Lambal, Montkoñtour) pe eun derzienn-alter (An Uhelgoad).

Da lavared mad, kement tra – ha pa vefe ar spontusa tra – eur kustum da gonta diwar-benn loened iskiz mojennou an amzer gwechall a zo disterig a dra e-skoaz ar pezh a vez tamallet d'ar sourd. Barreg eo, deuz a-bell zoken, da zuna beteg ar berad diweza gwad eun ejenn lard (Plouagad). Eur zell a-gorn war eur penn-kezeg, emañ ar jô d'an douar, evel diskaret gand ar gurun (Lezneven). A-wechou, evid o flijadur nemetken, en em lak ar sourded da faouti pilgosou a-daoliou lost (Lanildud, Plougerne, Plougastell, Berrien, Skrignag). Eur c'hoari eo ivez evito pe eun doare embregerezh, lammad dreist penn an dud. Ma c'hoarvez se gand eur bugel emañ kollet e gresk gantañ, nemed badezet e vefe a-nevez, ar henta ar gwella (Gwitalmeze, Porsall, Plouvien, Kraozon, Lanveog). Eun den gour ne vez ket kalz kaeroh e stal. Gouest eo da veza skoet mud war an taol (Plougastell). E glopenn a hell tarza e daou damm (Loperhed) hag e kouez, dre ar faout, plom-teuz war e empenn (Kore). A-wechou e hor eun torad sourded bihan e-kreiz ar farz-penn (An Ospital).

Ar faltazi n'eus harz ebed dezi! Sourded a zo e sav c'hoant ganto mond da zena ar zaout. Remed ebed evid digontamma al lêz a vo gand ar buohed-ze da houde, ha gwaz a ze da biou bennag a gemero eul lonkadenn anezañ. Eul lamm er beurbadelez a-raog ar huz-heol, ha peoh! (trowardroiou kêr Vrest). E Kolorog, ar vuoh eo an hini a gouez klañv. Koll a ra he lêz, treud-gagn e teu de veza ha ne zalh ket ken ouz an taro. Ar Werhez Vari heh-unan, tud kêz, he-deus bet hi ivez, da zamanti diwar-goust ar sourd. Eun abardaez ma oa dispak-kaer he bruched ganti o rei chukig d'he Mabig, ar hast louz a gredas en em spega ouz he bron (Langolen). Mab-den, gwir eo, n'e-neus ket da gaoud keuz d'an taol diod-ze. Abaoe an devez-se, bewech ma lak e voutez war eur sourd, Doue dre anaoudegezh vad a zizamm anezañ deuz deg euz e behejou.

Fallagriez ar sourd, am-eus aon, n'eus dezi muzul ebed. Eur wall gudenn e vefe marilla beteg an diweza hini an torfedou berniet war e goustiañs, kement ez eus anezo. E bro ar Hreisteiz da skwer, e-kostez Toulon, pa venn da unan bennag ober droug d'en den all a zo en e houlou, setu amañ penaoz ez a dezañ: tapet gantañ eur sourd, e lak

anezañ ez-veo en eur voest vihan dezi stumm eur serch, ha gand eur spillenn e toulldreuz an archedig-ze a-zioh kalon al loen. Arabad d'an hini e tegouezo ar pakadig-ze gantañ, gortoz re bell d'ober e destamant. Sklêr eo e setañs!

Ken sklêr all e vez e setañs d'ar sourd, gwechou a zo, rag eun devez e ve, e teu e dro dezañ ivez da houzañv. Peseurt kastiz vo hini ar muntre a zo anezañ? Ar maro, anad eo, krak ha berr. Penaoz avad ober d'eun diaoul mervel, eun euzvil hag en em gav ken kaer all e-kreiz glaou beo an tan?

Kit dezañ gand eur forh-houarn, sankit eur biz anezi en e gein, eil-pennit ar benveg ha plantit an troad en tirienn. Mad! Kemerit bremañ ho kwalh a blijadur o selled ouz ar pezh-droug o tispaha hag oh en em zifreta etre an neñv hag an douar. Dizammit, m'ho-peus c'hoant, ho kalon gand eur rastellad kunujennou. Amzer a zo deoh: ne vo termen ebed d'ar c'hoari keit ha ma ne cheñcho ket an avel roud. Neuze, nemetken, e peurnezo ar hagn daonet e neudenn (Gwitalmeze, Kraozon, Mêl-Karêz). Kement hag ober ouspenn, mar doh butuner, tanit 'ta eur zigaretenn ha lakit anezi dezañ en e henou. Regadou moged a deui gantañ c'hoaz, marteze, war e dalarou. Peadra vrag da domma deoh ho kwad, neketa? – Merzerenti a livirit. Arsa 'ta! N'oufed morse beza re yud e-keñver eul loen milliget. Ha n'eo ket fall kennebeud, emichañs, d'eur bourreo kaoud daou wennegad ijin!

Trowardroiou Kemper, Montroulez, Plougastell... e leverer e teu gwinniz druz er parkeier ma vez bet greet e stal d'eur sourd evel-se. Setu ivez komzou a vez klevet e-kostez Langolen ha Sant-Wazeg, nemed du-ze e rank al lid-laz beza greet a-zioh eur vodenn spenn gwenn. Anez da ze e koll an aberz an nerz-hud a dle beza e hini. Hogen, doareou all ken dichipot a zo d'ober d'ar sourded en em zihlea. E Brenniliz e vezont krouget, staget a-istribill ouz eur wezenn, dre o fenn, pe aliesoh, dre o lost. Krisoh pinijenn c'hoaz a zo ouz o gortoz e Plounevez-Moedeg. Du-ze e ranko an hinkin, war-nebeud, gouzañv ar hastiz a veze hini an dorfedourien vraz gwechall, pa veze dispennet o horv d'ar re-mañ war eur rod karr. Da genta, e reer eur skoulm gand eur poell war pep hini euz e baioi ha war e lost. Da houde e sacher war al lasou evid o stegna reud etre bizier sanket en douar. Hanter dihaoliet pe dost, ha dichontret e izili dioutañ, al loen a jomo aze bremañ da graza, beteg ma kouezo d'an douar e relegenn zeh. Truez ebed da gaoud!

Geo! Rag e-doug ar wech ez eus bet eur ouenn dud da houzoud ober lagadig flour ouz an hailloned, forz peseurt gwall-re e vent. Seul vui zoken m'eo braz gwall-vrud an haillenn, seul vrokusoh ez eur gand an damant evitañ. Evel pa skedfe diouz gwsa forbaned ar Béd eun dreistkened, eun achantourez hoaluz kap da deogi kement hini ahanom. Gwelit Jili a Retz, Fontanella, Marionig ar Faoued, ha tostoh deom: Mesrine! Boued ar groug, ya zur, ez eus gantañ blazenn hweg aval temptuz or Mamm genta.

Ar sourd, eñ ivez, ez eus dezañ karourien, ha zoken, azeulerien, pe dost. An Arabed, da skwer, e vez stad enno pa zigouez dezo kavoud eur sourd war o hent. Eun drugar m'emañ e-kichennig eur voskeen. Mahomed n'oufe beza gwenvidikoh! Hogen, n'eo ket dao mond pell evid gweled tost kemend-all. En or bro deom-ni ivez ez eo stank a-walh ar horniadou m'eo digemeret mad ar sourd enno. Ma teu e-barz an ti dreist an treuzou, e heller beza laouen (Plonevez-Porze), rag dougen chañs a ra d'an tiegez. Digas arhant a ra, zoken, ouz e heul, gwechou a zo. N'eus ket kaerroh taol, kennebeud, eged koueza war eur sourd kousket e strad eur feunteun. An dour euz homañ, goudeze, e vez gantañ e-leiz a vertuziou. Eul louzou heb e bar a zo anezañ evid para kleñvejou a beb seurt. Barreg eo, zoken, da lakaad eun astenn da vuhez an den en eur bellaad ar gozni dioutañ... Mousc'hoarz Paracelse n'emañ ket pell... Daoust ha n'e-noa ket kavet ar medisn braz, hervez tud e amzer, ar voyenn da zerhel an neb a gare e barr e yaouankiz? Ha se keit ha ma plije gantañ?

Eet or mezeg e-unan da anaon koulskoude, daoust d'ar sekred oa e hini, ar maouezed, memez tra, a zalhas d'e genteliou war e lerh. A-raog ma oa deut ar hiz da gaoud krohenn rouz, ar merhed brao, e-pad kantvedou, o-deus bet greet o seiz fosubl da vired o hoantiri e-ratre en eur amanenni o begig flour gand eun doare traet pe eoul-teo aozet diwar lard-kanded ar sourd hag ar gwad ponner anezañ. Setu! Klask a veze ivez war al loen, gwechall, kerkent ha ma kroge kleñved al loventez da ober e reuz en eun tu bennag. Ar sourd, eme an apotikerien, a ouie brao « debri » klañvennou ar hakouz, ha dreze, skañvaad tamm pe damm poaniou an den kêz.

Kalon ar sourd – hen adalvared a ran – a zo kuzet, hervez tud a zo, e-barz lost al loen. Eun dra zispar eo emezo, al lodenn-mañ euz an aneval, da zougen chañs. Eun tislam o leuskel pell war e lerh ar velchenenn bederdelienn. Brasoh perz ez eo c'hoaz e hini m'e-neus al lost an eurvad d'en em zistaga dre-natur diouz korv e berhenn evel

ma ra hini eur glazard pa zav beh warnañ. Netra nemed eun netraig anezañ evid ho tiwall diouz droug ha droug-chañs. Ha pell ahanoh ivez ar zoñjou teñval o houlfé dond da askellgrohenni a-zioh ho penn! (Gwipavaz, Plouvien, Terug, Ar Hastell-Nevez, Rosporden, Kallag, Pluskelleg...).

Emañ dirazom a-barz ar fin – n'eo ket re abred – perziou fall ar sourd en eur zah, hag e berziou-mad en eur zah all. Da houzoud pehini euz an daou zahad eo ar ponnerra, taolom anezo dreist ar gorz e-barz ar harr a zo e-kichenn, unan er penn uhella anezañ, egile war al lost, e peb tu d'an ahel. Peseurt van a ra ar gazeg limon? Beh a zo war he hein, pe skañv-bouez a zo gand or harrad? Unan a zaou. Ar sourd? Hudur pe zihudur eo an oristal? An eil hag egile. Hervez ho polontez, tudou. Amañ n'ez eus netra da ober gand pouezanter pe dihouezanter eur zahad avel. Emaom war dachenn ar hredennou-pobl. Netra ken. Eun ehonder dîez da gaelia, eul lehidenn wag ha direziz o kreski hag o tigrski gand ar mor o pignad hag o tiskenn. Ne dalvez da netra, amañ, klask gouzoud peleh emañ an disparti etre ar gwir hag an eneb-gwir. An oll zanvez a ya dre doullou an tamouez hag en em gemmesk a-nevez e kern Meill-ar-Gaou. Kredennou, briz-kredennou, fals-kredennou, – ne vern an ano – eur chadenn nemetken a zo outo toud. Mellou kaled dezi e houarn dirennet, goveliet war eun anneo ne oar den peleh emañ. Eur chadenn ha n'eo bet torret biskoaz, ha ne vo biken, am-eus aon... Ouspenn eur Yann-Zeitig e veze gwelet gwechall, war ar plasennou-foar, o tostaad ouz pallenn moug al lennerez planedennou... Eur vicher eo homañ hag a oar brao derhel da vond endro. Hirio, avad, ar jipzianeaz ez eus dezi eur studio ekipet a-zoare: kador-hourvez, sonskriverez, telefon evel-just (o houzoud respont e-unan) ha zoken, aliezig a-walh, eur mini-urziater... Nann, n'eo ket warhoaz e torro chadenn goz ar hredennou! Gouzañv a ra, a vare da vare, koll mell diweza penn he lost; kerkent avad, du-ze er penn-komañs, paotr an anneo en em lak da farda eur mell nevez. Evel al lenkernenn vraz e bouzellou Yann-Zeitig!

**Charlez ar Gall.**

**Notennou:**

Morse n'eo bet eet diwar va spered ar spontadenn a oa bet va-hini pa oan mousig. Setu perag, moarvad, ez eus bet savet c'hoant ennon, diwezatoh, da houzoud hirroh diwar-benn ar sourd. Lennet em-eus, evid skei war an tu-ze, tri pe bevar leor (1).

furchet e paperennoù a-gleiz hag a-zehou (2), ha torret o fenn re aliez d'an dud war va hent gand goulennou a beb seurt.

Er bloavez 1958, ha me neuze kelenner er Bouguen e Brest er skolaj a zo deut abaoe da veza L.E.P. Dupuy-de-Lôme (e Keliverzan), e kinnigis d'ar grennarded a oa ganin er skol, ober ivez eur rumm goulennou ouz o zud, o herent hag o amezeien, e-pad ar vakañsoù braz. Eun toullad kaer a responchou a deuas din goude an Eost. Testeniou o talvezoud evid 132 a barreziou (Penn-ar-Béd: 108; Aodou-an-Hanternoz: 17; Morbihan: 7).

Diwar an danvez rastellet evel-se gand va skolidi (ra vezint trugarekaet, int hag a zo eet en tu-hont d'o daou-ugent vloaz) hag ar pezh am-oa pennaouet me va-unan diouz va zu, e savis eur pennad e galleg (**Une bête immonde**) a zo bet moulet war **Les Cahiers de l'Iroise** e 1959 (Niv. Genver-Meurz) (3). N'eo ket eun droidigez ger evid ger euz ar pennad orin eo ar pennad embannet hirio gand **Brud Nevez**, med eun adstummadenn anezañ. Pa ouezer pegen buan ez eo eet ar Béd endro e-kerz ar 25 bloaz diweza, souezuz e vefe n'en-defe ket ar sourd kollet eur gwiskad mad euz ar hredennou o-deus bet greet outañ, e-pad kantvedou, eul loen imboudet diwar an Diaoul, bourreo ha merzer a beb eil. Evid gouzoud reiz ment ar hemm deut e sperejou an dud e rankfe, avad, beza greet eun enklask nevez.

(1) E dastumadenn **Que sais-je?**, niv. 413: **La Magie** (J.A. Rony); niv. 506: **L'Alchimie** (Serge Hutin); niv. 756: **La Sorcellerie** (Jean Palou).

(2) **Fichier Scolaire Coopératif** (Cannes). Niv. 703/1 (661, 662).

(3) **Les Cahiers de l'Iroise**. Kelaouenn **Société d'Etudes de Brest et du Léon**.

Ch. ar Gall.

## Kavet e vez **Brud Nevez** hag ol leoriou da brena e ti:

Ar Béd Keltieg, ru ar roue Grallon, Kemper.  
Ar Béd Keltieg, plasenn Guérin, Brest.  
Gwalarn, rue des Chapeliers, Lanuon.  
Kornog, 22, ru ar Vur, Montroulez.  
Breiz, 17, ru Penhoet, Roazon.  
Breiz, 10, rue du Maine, Pariz.

Prenit ol leoriou e ti ar varhadourien leoriou

Ma n'o-deus ket anezo, lavarit dezo goulenn anezo digand:

Diffusion Breiz  
29135 Speied

## ENDRO DA VANTAN ZANT-JEG

### Eñvorennoù

#### E skol ar baotred, e Lann-Jeg

Seiz 'la e oan pa oan kaset d'ar skol evid ar wech kentañ. E Porz-Berr e oa neuze mamm o chom. Goulenn a reas gand Fañchig, mab tonton Herve, dond da gemer 'hanon en eur dremen...

Ha setu-ni 'ta on-daou war hent ar bourk. Trist e oa Lommig, ar beurevez-se, kredit ahanon. Ruzañ a reen ma zreid war-lerh Fañchig. Hemañ, skuiz o hortoz ahanon, a gemeras ma dom 'n e hini hag a gomañsas da jechañ warnon... med koll a ree e boan rag dre ma pellaen douz ar gêr, en em losken muioh-mui da vezañ jechet... ha krial a reen a-bouez-penn evid bezañ klevet gand va mamm hag an amezeien: « N'in ket d'ar skol! N'in ket d'ar skol! »

E oam o tiskenn grav Kergrist, Fañchig o jechañ war e zamm ha me o ouelañ hag o tripal ar muiañ ma hallen, pa glevis a-greiz-toud eur vouez o krial 'dreñv din:

— « D'ar skol, laran-me, ha primmoh 'vid-se! » ha kerkent e santis eun taol paiplo o kouezañ war ma diadrefiv. Va mamm a oa aze, he disglavier 'n he dom. Kaer em-oa gouelañ, ne oa mann ebed d'ober. Red mad e oa din mond d'ar skol, ha hastañ buan mond.

Med pah aias Fañchig hag e deskard er skol, ne oa kristen ebed e-barz ar porz. Eet oa ar skolidi e-barz ha klevet e veze eur vouez o hourdrouz ar ganfarded.

Fañchig a duoras dor ar hlas bihan hag a voutas ahanon e-barz. Ha setu-me eno, duor braz ma daoulagad ganin, 'n em zav ha difiñv, heb gouvezed pesort ober. Dija eur hanfard, brasoh evidon, a ree zin din da vond 'n em hoañze 'n e gichenn, en eur skeiñ gand paly e dorn war ar bank. Med ar vestrez-skol, diskennet douz kreh he hador-geleñn, a dostaas da gemer ma dorn en he hini en eur lared din: « Bonjour Guillaume! Dis: Bonjour, Madame!» Guillaume, setu aze e-noa dija cheñchet ma han'-bihan din. Guillaume ha biken jamez, itron! Lommig e oan ha Lommig e chomfen; ha kaer he-doa lared ha hadlared: « Dis bonjour, Madame!» Lommig a chomas mud, mud evel eur pesk.

Ober a reas din mond 'n em hoañze war ar bank kentañ ouz troad he hador. Ha setu-me, Lommig, paotr bihan Lomm Vraz, Lommig, leshanvet Guillaume gand an Itron gaer-ze, e-barz eur zal vraz, didu e-touez ar ganfarded all, heb komprenn ger ebed douz peza lare « Madame » pintet 'uz din en eun spes kadorzarmon.

War-benn eur momed, an itron gaer a reas zin din da zevel hag ar paotrig a oa 'n em hichenn a roas e dorn din ha nim on-daouig, gand ar re all, da vond da foñs ar hlas, etre ar prenest hag eur pez fornigell ha ne oa tan ebed ennañ.

En-pign ouz ar vogel e oa taolennou gand merkou dianav evidon. An itron ah eas 'n he hoañze war eur gador; kemer a reas eur vaz hir ha moan ha komañs a reas da vale 'nezi war an daolenn en eur lared: « i...i... répétez i. » Ha me, evel toud ar vugale all, a hadlare war he lerh: « i...i... répétez i » hag e c'hoarzent toud, kanfarded hag itron, en eur zelled ouzin.

« Allez, Guillaume, dis i...i... lar i...i... 'n e-unan...i »

Komprenet em-oa erfin ha me da lared a-bouez-penn evel ar re all: « i...i...i... » ar hreñvañ ma hallen.

Pa retomis d'em flas, an Itron a roas din eun « ardoazenn » hag eur hreion-mèn. Tresañ a reas warni al lizerenn « i » hag a laras din ésaad hen ober d'am zro. Ha me, paour-kéz deskard diampart, o pouezañ ar muiañ ma hallen war ma hreion ken a wigoure

war ar mèn-glaz, hag oh ober barrennou gand eun tok bihan war o fennou. Tufañ a reen war ar mèn evid diverkañ al lizerennou ha torchañ a reen 'ne gand amdu va breh goude o bezañ diskouennet d'an Itron.

O weled 'hanon o tufañ, an itron a reas zellou du da Lommig hag a laras e galleg: « Il ne faut pas cracher, Guillaume. » Ha hi gand he « Guillaume » arre. Krog e oa an droug da dond ennon... ha chom a reen mud ha hurennet, kaer he-doa ésea disklériañ din en eur yez na gomprenen ket 'nezi e vefe red din kad 'benn an deiz war-lerh eun torch da nétaad va mèn-glaz.

Dalhet am-eus zoñj douz c'hwez gleb-loued an torch-ze stag ouz va mèn-glaz gand eur fiseleñn hag a vrañskelle pa zaven 'nañ a-uz d'am fenn da diskouenn va labour d'ar skolaerez: c'hwez mesket an tuf, al loustoni, ar hleiz hag ar poultr kreion-mèn.

Diski a ris buan-tre lenn war an taolennou « Boscher ». Lenn a reen gerioù ken diéz ha « xylophone » ha « Xénophon » heb gouvezed 'vel just diouz petra e oa kision.

Eun deiz, eun tokad deizioù goude ma oan krog da vond d'ar skol, e oam adarre bodet, en traoñ ar hlas, dirag ar vogel gand he zaolennou kartoñs gwenn. Diski digejañ ar gensonenn « m » on d'ober ha dustu em-oa divinet an dro-bleg pugur evid peb kensonenn e veze heuillet peb taol ar memez mod. Skuizañ a ris prim oh azennañ: « me, ma, mi, mo, mu » evel em-oa dija azenet « be, ba, bi, bo, bu » ha « de, da, di, do, du ». Ha me da dreiñ kein d'an daolenn ha da zelled ouz ar re « vraz » chomet 'n o hoañze en o flasou... en eur derhel da ganañ va randonenn: « me, ma, mi, mo, mu », evel bugale ar hatekiz o tibunañ o « goull ha respont », pa zantis eur gelastrenn o foetañ va diadrefiv ha daou viz stard o piñsad va skouarn.

—« Regardez-moi ce petit coquin-là qui ne suit pas » 'me an Itron. Petra a oa c'hoarvezet ganin? Ar vestrez-skol, e-leh derhel 'vel an ordinal da heuil al lizerennou hag ar zilabennou an eil war-lerh eben evel ma oant merket war an daolenn, he-doa baleet he baz eun tamm dre oll, o lampad douz eul linenn d'eun all... ha Lommig, ar hanfard, troet gantañ ar memez diskant: « me, ma, mi, mo, mu ». Eun doare-lenn, difaziuz hervez ar vistri-koz, med

eun doare hag a gaven 'nañ enoëüz-tre... med adaleg an deiz-se, goude bezañ bet gourdrouzet gand ar skolaerez, e taolis muioh evez da vale ar gelastrenn war an taolennou « Boscher ».

Dond a reas din tamm-ha-tamm ar c'hoant da lenn pezh a welen skrivet war ar hazetennou, al levriou a gaven e grignol an Itron Kogan pah een da weled 'nezi: berniou levriou-skol chomet eno abaoe an amzer e oa an Ao. Kogan mestr-skol e Lann-Jeg.

Ha neuze, peb sadom d'abardaez, an Itron a gemere eul levr 'barz eun armel vraz e traoñ ar hlas hag a lenne dim eur gontadenn bennag: hini ar « Habellig ruz » pe hini « ar Haz heuzet » pezh ah atize va c'hoant lenn.

Ne larin jamez tra-walh pegen anaoudeg eh on d'an Aotrou ha d'an Itron Perez, mistri dispar, gouizieg hag emrouiz. Taol a reent evez da doud o skolidi ha gouvezoud a reent kalonekaad 'ne war o labour. Pa deuis da chom d'ar bourk, evel ma oan tost da skol ar baotred, eh een da hoari, d'ar yaou, e-barz ar porz-skol gand plahad bihan an Ao. hag an It. Perez. Homañ a oa unan euz gwellañ klianted va mamm ha pa deue da brenañ he marhadourez, goude ar skol, d'abardaez-noz, e chome d'ober eur gaozeadenn ganti. Renti a ree kont d'am mamm ha d'an Itron Kogan douz labour Lommig hag e vreur ha red e veze dim labourad stard: ober on foelladennou ha diski on henteliou dustu goude ar skol a-raog bezañ aotreet da vond da hoari war blasenn ar bourk pe 'barz ar porz-skol pe da vond da weled tonton Job ar marichal 'n e hovel.

Pah antreis 'barz ar hlas braz, hini an Ao. Perez, goude bezañ bet e-pad daou 'la e klas an Itron, e oan an hini yaouankañ douz e skolidi. Lakaad a reas 'hanon war ar bank kentañ, dirag e vuro hag e zellou ordinal war evez ne guitaent jamez pezh a vezen oh ober.

Striz ha reizeg e oa an Ao. Perez. Ober a ree d'ar ganfarded labourad stard, heb ehan, a-hed an deiz hag ar zun. Bep peure pa zone nav eur 'med pemp 'barz orolaj an tour — an eur a zone div wech, an hini gentañ da ved pemp — en em vodem d'ar galoup, war daou renk, dirag dor on hlas. Eun taol c'hwistell, ha ne veze ken klevet trouz ebed.

—« Montrez vos mains!» a gemenne an Aotrou Perez ouz in diskenn teir bazenn ar menk-ti. Ha pep hini ah astenne hag a droe e daouarn war an daou du, pa drem'ne ar mestr-skol dirakañ.

—« Va me laver ça!» hag an hini a veze tapet gand e daouarn louz a haloupe da walhi 'ne d'al « lavabo ». Pesort « lavabo », tudou kèz! Pemp boest boued-mir staget ouz moger ar hlas gand pevar doull poentenn en o foñs. Ar skolaer a dape eur zaillad dour, garge ar boestou hag ar vugale a frote o daouarn dindan ar peder diveradenn.

Nêtaet ganim on daouarn, e oam prest da labourad. Med evid reiñ kalon dim e veze kanet eur ganaouenn. « Les Alpes dans l'espace dressent leurs purs sommets » da skwer; pe « Le tisserand dès l'aube se démène », pe c'hoaz « On rentre de l'église, rougis par l'âpre hiver » petramant c'hoaz « Camarade vigneron, je te dis courage ». An nor etre an daou glas a veze losket duor ha toud ar vugale-skol, bihan ha braz, a gane a-unan.

D'ar zadom d'abardaez, eur wech er miz da nebeutañ, e tiskem eur ganaouenn nevez hag e hadkanem ar re a hovezem ane dija evid derhel zoñj mad douz ar geriou ha douz an ton. Hemañ a veze roet dim gand an Ao. Perez, war e violoñs. Ha toud e vezem bodet endro dañ 'barz klas an Itron hag a oa brasoh evid hini an Aotrou.

Kanet gantañ ar ganaouenn veure, pep hini a gemere e blas war ar bankou, hag an traoz siruz a gomañse. Hervez deiz ar zun, e veze greet eur gentel « morale » pe unan skritur, pe unan jederez. 'Vid pezh a zelle ouz ar gentel « morale », an Ao. Perez a lenne dim eun danevell, petramant e tisplege eun istor hag a houlle ganim lakaad 'nezi e-berr ha reiñ on ali diwar-benn pezh a veze bet lavaret. 'Vid echui ar gentel, pep hini a skrive war e gaier pemdezieg, gwellañ ha kaerrañ ma halle, eur setañs a dlee kas zoñj dañ douz ar skwer vad e-noa da heuil.

Kentel skritur an Ao. Perez a oa hini eun arzour, Tresañ a ree, war an tablo, gand eur pezh reolenn plad ha hir, linennou hañval ouz re on haierou 'vid nompaz mantrañ ahanom. Neuze gand kleiz ruz e trese al lizerenn da studiañ, an deiz-se, eul lizerenn-skwer gand he linennou moan hag he re ledan, en eur vuzuliañ niver

an hedou-etre, en eur verkañ gand eur pik pe eur groaz vihan leh an disparti. D'on zro neuze, war on mên-glaz d'ober liez êsa araog bezañ aotreet da gemer on fluenn da skrivañ war on haier. Dija an Aotrou Perez e-neze treset wamañ lizerennou-skwer gand liv ruz.

Mond a ree douz an eil d'egile; azezañ a ree en on hichenn war on bank, ha ma ne gave ket mad a-walh on foelladenn, e kemere e bluenn hag e liv ruz evid hadziskouenn dim penaoz ober.

D'ar houlz-se ne oa ket bet ijinet c'hoaz ar « jedonez arnevez ». Med akuitaet-tre e oam da jedi ar primmañ posubl ha heb fazi. Disket e veze dim ken daspugn, lemel, lieskementi, keidrannañ en toud ar stummou ha war herrentaad beb sun. Eur gentel hag a blijie din dreist-oll. Gwir eo e oan dija kustum da jedi e brezoneg rag kleved a reen baondez va mamm hag he hlianted o kontañ realiou ha skoedou, pezh a oa kalz diêsoh evid kontañ e galleg, neketa?

Al lodenn vrasa douz on beurevez a veze gouestlet d'ar jedonez. Goude bezañ chilaouet gand evez disklêriaduriou ar mestrskol ha greet liez poelladenn war on mên-glaz, e veze roet dim daou broblem da diskoulmañ. Ha pesort problemou... war diêsaad baondez... Chilaouit kentoh:

—« Pemp micherour o-deus lakeet eiz deiz da doulañ eur hleuz hag e-noa daou hant hanter-kant metr a hirder ha daou vetr a ledander. Pegeid e lakfe eiz micherour da doulañ eur hleuz hag e-nefe daou hant metr a hirder ha tri metr a ledander? »

Petramant c'hoaz:

—« Eun duellenn a laka teir eur da gargañ eul laouer. Eun all a laka div eur. Pegeid e lakfe an div duellenn asamblez evid he hargañ? »

Hag a-wechou e veze lakeet e-pad eur memez amzer eun duellenn all da diskargañ al laouer. Ahanta, kredit 'hanon ma 'peus c'hoant, med 'benn fin ar bla, e veze barreg toud ar skolidi da gargañ ha da diskargañ n'eus forz pesort laouer ha da doulañ toud ar hleuziou posubl, heb fazi ebed.

C'hoarzin a ret, mat'se... Ha koulskoude eo gras da genteliou-jedonez an Aotrou Perez ma oan bet renket 'barz ar rummad uhellañ e-pad va hoñje 'barz an arme-vor. Gouvezed a ret e vez trem'net eun amodenn pah aïer e kazarn ar vartoloded e Brest pe e Toulon. Ahanta, ar problem roet dim da diskoulmañ a oa hini an tuellennou. Hag evel just e tiskoulmis nañ heb fazi.

Echu ar jedonez, e veze lennet, a-vouez-uhel, pep hini d'e dro, ha goude e veze studiet ar roll-geriou. An Ao. Perez a choazez pemp ger. Disklêria a ree dim ster pe talvoudegez pep hini ane ha dim neuze d'ober pemp frazenn en eur implij ar geriou nevez-disket. Peb kanfard a lenne e frazennou hag ar mestrskol goude bezañ goullet on ali ganim a dibabe ar re wellañ, a veze skrivet gantañ war an tablo. D'on zro e skrivem ar pemp frazenn war on haier en eur gouverkañ ar pemp ger nevez.

D'abardaez, e hadkrogem gand on labour en eur ober eur skrivadenn — eur pennad-skrid anvet e galleg « dictée ». Ar geriou diêsañ a veze skrivet gand ar mestrskol war an tablo, disklêriet e vezent gantañ ha digejet ganim, a-vouez-uhel, lizerenn dre lizerenn. Hadskrivañ a reem 'ne pemp kwech war on mên-glaz. Displegañ a reem dre eñvor reolennou an anv-gwan-verb implijet gand « kaoud » pe « bezañ », div, teir gwech ouz red ha pa vezem bet kontrollet ha hadkontrollet da weled hag-eñ on-deze komprenet mad ar reolennou, e komañse an Aotrou Perez da dezrevell ar pennad-skrid, goustadig, goustadig, ger war-lerh ger, en eur distagañ peb silabenn, en eur vond hag o tond diouz eun daol d'eben, o taol eur zell evezieg ouz kaier pep hini ahanom hag en eur lakaad, ouz red, e viz war on faziou d'ober dim divankañ ane ha taol muioh evez d'on labour. Pa 'neze fin da dezrevell, e hadlenne ar pennad-skrid ha neuze on-deze pemp munut evid klask on faziou.

Zoñj mad am-eus ivez douz ar henteliou istor ha douaroniez. Ne veze kad, d'an amzer-ze, er skolioù, na filmou na fotoiou evel bremañ da diskouenn d'ar skolidi na levriou gand skeudennou liezlivet... Med an Ao. Perez e-noa eun toullad levriou ha diskouenn a ree dim ar skeudennou a veze wame, pa 'neze fin gand e gentel. Kuitaad a reem on flasou da vond d'en em vodañ endro dañ, dirag e vuro, preset da daol eur zell ouz e skeudennou sur 'walh, med ivez da divavañ on diharr... Ha Lommig a brofite

douz ar momed-ze evid piñsad diadrefñv e gamarad Penn-kig-sall, jechañ war blev Polich pe hilligañ e gilpenn da Nouchig gand beg e greion.

Nag a blijadur o klevet an Ao. Perez o kontañ dim taoliou-kaer ar vrezelourien vrudet: Bayard, Assas, Bara, buhez pompaduz Loeiz XIV en e balez Versailles... trehiou Napoleon. Gouvezed a ree birvillañ ahanom ha gwelet am-eus meur a hini ha me da gentañ, sunañ e fri pa varve Bara, pa guitae Napoleon e vro evid kemer hent an harlu. Gwir eo e oa ar brezel braz o paouez echuiñ hag on mistri-skol, bet greet gante ar brezel milliget-se, a oa brogarourien entanet. Kanet e veze c'hoaz er skoliou « Mourir pour la patrie, c'est le sort le plus beau ». Er gêr, e klevet ivez ar vugale-skol o herent distroet douz ar brezel o kontañ stourmadou kriz ha brudet evel hini Verdun. Ha setu penaoz, ni, bugale-skol Lann-Jeg, ni ha ne hovezem mann ebed douz istor Breiz, eh anavezem buhez soudarded ha rouanez Vro-Hall ar muiañ brudet. Ya, siwaz, ne veze jamez komzet dim diouz istor on Bro-Vreiz, ma n'eo evid lared dim pa veze kaoz diouz an Normaned, e oant bet trehet gand Alan Varveg e Toull-ar-C'hwiled, war ribl an Treo, tost da Lann-Jeg. Ar skol, hervez kredenn an Ao. Perez hag e genvreuder, a oa greet evid diski ar galleg. An hini a hoveze lenn, komz ha skrivañ ar yez-se heb fazi, hennez a oa kazi-zur da gad eur vicher vad diwezatoñ, kalz gwelloc'h evid hini e gerent ha n'o-doa komzet med ar brezoneg a-hed o buhez. Ar galleg, evite, a oa eun alhwez burzuduz a duore hent ar skridou-testeni, da lared eo, hent an arhant, eur vuhez êzet hag evruz. Med evid-se e oa red studiañ stard er skol.

\*

Eur wech ar zun e teue douz kazarn ar 48ved R.I. deuz Gwen-gamp, eur zoudard karget da reiñ dim eur gentel embregerezkorv. Aied a ree, war e varh-houarn, war-dro teir eur d'abardaez. Lakaad a ree ahanom e renk, daou-ha-daou evel ma vijem bet dija oh ober on hoñje ha diski a ree dim, da gentañ toud, kerzed d'ar paz. Kerzet a veze 'ta d'ar paz, greet e veze hanter-droiou war an tu dehou hag an tu kleiz ha fiñvadennou a beb seurt gand on fenn, on divreh, on diharr, on horv braz. Lakaad a reem on daouarn war on dilez, da blegañ war-raog, war-dreñv, war an tu kleiz hag an tu dehou; 'dreñv d'on hilpenn evid treiñ on fenn 'trezeg

an oll azimutou. Achu toud ar fiñvadennou skuizuz-se, e tiske ar zoudard dim, peizanted vihan disterrañ parrez ar hanton, emzornatañ hervez an doare-gall.

—« Un' daou...un' daou – daou... eun taol-dom kleiz, dao!... un' daou, un' daou – daou, eun taol-dom dehou, dao! un' daou, tri... kleiz! un' daou – daou... eun taol-troad kleiz... un' daou... un' daou – daou, eun taol-troad dehou...» hag ar memez rimadell ah amheulie on strivou diampart.

Red vije bet gweled emzomaterien Lann-Jeg gand o botou-koad tached hag o brageier voulouz hir oh êsa heñveloud korporal an 48ved R.I.

—« Un' daou, un' daou – daou,» ha gwech ha gwech all eh ee kuit botez-koad Lommig! Pesort komedi!

Laret am-eus bet e plije din ar henteliou douaroniez. Diski a ree an Aotrou Perez d'e skolidi tresañ kartennou gand kreionou-liv. Ha gouvezoud a reem al liviou aotreet evid ar « Zantifikad » ha pez a zinfie pep hini ane: glaz evid ar stèriou hag ar moriou, kistin evid ar menezioù, gwer evid ar plènnennou, h.a.

Red e veze dim gouvezoud dre eñvor listenn an departamantou, hanoiou ar penn-lehiou ha re an is-prefekturiou, anavezet uhelder ar menezioù, hanoiou an odeou, ar stèriou-meur hag o had-stèriou, re an tu dehou ha re an tu kleiz; ar hêriou stèriet gante ha niver an dud o chom enne; al linennou hent-houarn gand ar hêriou dizervijet, h.a.

Red e veze gouvezed lenn ar gartenn-vud ha lakaad an hanv reiz war beb poent, peb stêr, peb menez a diskoueze dim ar mestr-skol gand beg e vaz. Barreg e vijem bet zur mad da vond da dremen an amodenn evid bezañ implijidi ar P.T.T. pe da hounid ar « Banco » ma vije bet d'an amzer-ze c'hoariou ar Radio evel hirie.

D'ar zadorn d'abardaez, evel pa oam 'barz klas an Itron, e vire an Aotrou Perez an eur diwezañ douz an devez-skol, da brestañ dim levriou da lenn e-pad ar zunvez da zond. Med 'barz ar hlas braz, al levriou a oa seriusoh ha savantoh. Reiñ a ree dim da

choaz romantou, peziou-c'hoari, marvailhou, danevellou, kontadennoù a beb seurt. Bezañ e oa memez levriou a oa bet kinniget da skol Lann-Jeg gand ministr an deskadurez, mar plij! Ar re-mañ a oa peziou levriou teñv, koublet gand eur holoenn hriz, renket war eun estajerenn ispisial. Kad e veze en o zouez « Le théâtre de Molière », hini « Racine », hini « Corneille », oberennou « Victor Hugo, Lamartine, Chateaubriand, » h.a.

An Aotrou Perez a halve a-vouez uhel titlou al levriou hag ar vugale-skol a zave o dorn pa blije an titl de'. Lennet am-eus bet toud levriou an armel ha re an estajerennou stag ouz ar mogerioù, nemed unan hepken: « Poull an diaoul », eun hanv ha ne blije ket din, levezon kontadennoù ma zad-koz pe katekiz an Ao. Person?

Nag ' amzer am-eus bet trem'net o lenn ar peziou-c'hoari. Ne gomprenen ket kalz tra en galleg an aotrounez-ze, med ar gerioù nevez a gaven eno a drote dre va spered, gerioù tener, gerioù heglev, gerioù raouliet, gerioù fentuz, gerioù trist; a-wechou, o muzik a floure va halon, a-wechou all e lakee ahanon da dridal pe da verlobiañ.

An Ao. Perez a oa zur-mad kirieg da ze, rag lenn a ree dim, gand e vouez aour, pennadou douz ar peziou-c'hoari ar muiañ brudet euz ar XVIIved kantved. Dispakañ a ree dirakom arvestou a-bez euz ar « Cid, Horace, Le médecin malgré lui » – « À moi, Comte, deux mots! » hag ar skolaer a dornate e gelastrenn evel eur hleze.

– « Au secours! au secours! » a grie Harpagon, hag an Ao. Perez a glaske dre-oll an arhant kollet gand ar paotr koz. N'eo ket estonuz am-meze c'hoant goude-ze da lenn eveltañ, a-vouez-uhel hag en eur drevezañ e jestrou ar pennadou am-oa kad ken kaer pe ken fentuz ha chilaouet gand kemend a evez hag a blijadur.

Da vloavez va « zantifikad », d'an deiz kentañ ar bla, e kuitaas an Itron hag an Aotrou Perez skolid Lann-Jeg evid mond da benn-leh ar hanton. An Ao. Bleaz hag e wreg a gemeras o flas... ha pemp miz goude e oan kaset d'am zro, d'enori brasañ Sant a oa d'ar houlez-se en va bro, Zant-Ifikad, an hini a duore dor ar ouizie-gez, da vihannañ hervez pezh a zoñje va henvroiz.

#### **Paotr Jeg.**

(da vezañ kendalhet)

## **Istor ar Habili**

### **Pevarzegved pennad**

#### **Penaos ema ar marhajoù er Habili**

Bemdez e vez eur marhad bennag er *Habili*, hirio en eul leh, warhoaz en eun all. Er marhajoù-ze e vez eur forz a dud; n'eus forz pegement a labour, pegen nebeud amzer en-defe d'hen ober, eun den euz ar vro-mañ na jomo biken heb moned d'ar marhad. Ha pa n'en-defe netra da brena pe da werza, an dra-ze ne ra ket, eur *Habili* a yelo atao d'ar foar pe d'ar marhad!... En daill-all, ar *Habili* a gar kalz an traou nevez; evid gouzoud an nevezentiou, evid gouzoud petra a zeu hag a yal, petra a lavar hemañ, petra lavar hen-hont, eo red moned d'ar marhajoù! Ha neuze n'eo ket toud: d'ar marhad e renker moned evid kaoud eun tasad kafe, pe eur volennad te; n'eo ket ker; eur gwenneg an tasad. Er marhad e vez kavet ivez eur werennad limonad (dour kelhet), pe c'hoaz eur veskennad siro, hag ar gwella toud, mignonned, eur rumm-gartou ganto en o godell, prest da hoari e-pad eun dervez hed-ha-hed.

Gand ar hoariadeg kartou, dreist-oll, eo sod-tre ar *Gabiled*. Kalz a hoari beteg koll o oll danvez, o oll madou; meur a hini o-devez ranket roi o gwraez evid paea o dle. Kollet eo ar vro e gwirionez gand ar c'hoarioù kartou. Me a anavez eur gêriadenn a-bez revinet gand ar seurt c'hoarioù-ze. Tud ar gêriadenn a zo sammet a zle, hag heb dale, mar kendalhont da goll e vezint paourroh eged ar vrasa beorien.

Er marhajoù e vez greet an oll aferioù dre ar vro-mañ; eno e vez gwerzet ha prenet, greet al liziri-feurm, hag an oll draoù all evel-se. Er marhad eo e kaver ar barner-a-beoh hanvet *Cadi* evid roi e wir da bep hini; eno eo e vez embannet an urzou, al lezennou a-berz ar Gouarnamant; eno eo e vez paeet an dleou; eno e vez lavaret da dud ar harterioù all en em gavoud evid renka o aferioù, pe evid en em glevoud gand tud eur harter all. Er marhajoù er vro-mañ, e kaver ivez kement a zo red evid en em vaga hag en em wiska evel tud ar vro: *burnous, gañdoura, chechia*, kelhioù-breh, kelhioù-gouzoug evid ar merhed, koefou a beb seurt liou, louzeier euz peb kleñved nemed euz kleñved-ar-marò, plajou-koad braz, loaiou, klezeier, kontilli evel re ar Gabled, *kahol* evid liva en dro d'an daoulagad, *henne* evid ruza an ivinou, *tabokhol-iou* pe bodou-pri, *djarr-ou* pe bodou-kambr, bridou, *berdo-iou, telli-ou* pe *chonor-ou*, deñved, gevri, azenned, ejenned, beuhed, muled, ha kalz traou all. Ar gigerez a zo en eul leh distro. An anevaled a vez gwerzet, lazet ha lakeet a-gaterennou war ar blasenn-foar. An tammou kig a vez lakeet a-istribill euz peulioù plantet en douar. N'ez eus priz greet ebed; neb a bren a chilpot gwella ma hell euz an hini a werz ha peurvuia, an hini a chilpot ar muia eo an hini en-deveus ar muia finesa, hag en-deveus an tu-a-houniz. Midisined ar *Habili* o-deveus eul leh dibabet en dachenn-foar; eno emaint azezet war o zorchenn, endro dezo eun nebeud buretennadou louzeier hag a daol eur flêr gouest da lakaad eur marh marò da voned en araj. Embann a reont a-vouez-uhel madelez o louzeier, an oll vurzudou greet ganto; kalz anezo memez ouspenn ma lavaront ez int *Tobidou-ed* (midisined) a gemer an hanoioù kaer ha doujet a *zivinourien* hag a *zorserien*. Eur bobl a dud a vez bodennet endro d'ar farouelled-ze, d'ar varhadourien-gomzou-kaer-ze. Ar Gabled a zo diskiant, berr-spered a-walh evid en em lezel da veza gwadet o yalh dezo gand ar seurt gwaderez-ze.

Er marhajoù er vro-mañ e kaver bandennadou tud paour ha truilenneg, eun druez o gweled! N'eus forz e pe du e taolit ho taoulagad, ne welit nemed peorien oh astenn deoh o dorm evid goulenn an aluzen. Mar ho-peus ar gwall-chañs da dremen e-biou unan bennag anezo heb roi dezañ eun draig bennag, e kontfint ho pater deoh, en eur roi deoh a beb seurt hanoioù vil ha divalo. *Derviched* e vez ivez kalz anezo er marhajoù; mez ar merhed ne vent ket gwelet gwallstank. Ar *Varabouted* avad, a vez, koulz lavared oll, er marhajoù. Moned a reont evid gweled o deñved, da lavared eo tud o farrezioù. An deñvedigou paour-ze o-deveus kement a blijadur o weled o be-

leien er marhajoù, abalamour eno e hellont pokad da zaouarn ar *varabouted*; ar pez a zo eun enor evito, hag evid ar re-mañ, eur joaüsted a galon, evel na gaver ket e baradoz *Mahomed*.

Mez pa vo lavaret ar wirionez penn-da-benn, n'eo ket hepken evid ma vezo poket d'o daouarn, d'o zal ha d'o fenn gand ar bobl, eo e yel ar *Varabouted* d'ar marhajoù; kafe ha te a vez paeet dezo ivez; hag ar *Varabouted* a gar kement ar hafe hag an te!! Glaouri a reont pa vez komzet dezo euz eun tasad kafe pe de... Ar hafe hag an te a vez kavet ken mad gand ar Gabled evel ar gwin-ardant gand ar Vretoned. Ne vez ket greet eur marhad, ma n'heller ket kaoud eun tasad kafe pe de, pe siro. Kent-se, e pevar gorn ar marhad, e kaver staliou gante; ha n'eo ket eno e yel an nebeuta a voneiz. Endro d'an dachenn foar ez eus leun a deltoù: eno ema ar varhadourien, Arabed pe Juzevien, o werza kemend a zo red da gaoud evid beva hag en em wiska. Kalz cholori a vez klevet er marhajoù-ze, mez ar gwasa eo eh erru ivez kalz gwalleurioù. Rouez eo ar marhajoù ma ne glever ne ve ket bet unan bennag laeret, pe houliet, pe lazet memez. Goulskoude n'eo ket abalamour ne ra ket an archerien hag ar polis o dever; rag ar re-mañ a zo tud a zever er *Habili* koulz hag e Breiz-Izel.

## XVved pennad

### Peseurt micheriu a ra an dud dre ar Habili Al labourerez douar Madou an douar

Poblou ar Habili a zo pell-pell war-lerh poblou an Europ war hent an deskadurez. Mar houlennit diganen perag? Va lezit d'hen lavared deoh: digand poblou ar Habili eo bet lamet abred, siwaz, sklêrijenn ar Feiz kristen; pell 'zo emaint dalhet en deñvalijenn euz an oll youlou-fall; o spered a zo pounnerraet, dallet-oll. N'o-deveus den d'o blenia nemed tud ken dall hag int; penaoz e fell deoh e hellfe daou zen dall en em vleina an eil egile en eun hent striz ha ken diêz: o-daou e kouezfint war o fenn er foz; Jezuz-Krist eo en-deveus hel lavaret. Bro an Europ he-deveus da ziwall ivez da goll he bleinourez, me fell din lavared an Iliz katolik; lezenn Jezuz-Krist, sklêrijenn ar béd. Mar deo poblou an Europ eet kement a-raog en hent euz an deskadurez, e hellan lavared a-vouez-uhel, en deiz ma tilezint relijion o zadou-koz, e kouezfint ken izel, marteze izelloh, eged ma n'eo kouezet ar Gabiled.

Rag ar re-mañ, e micheriu 'zo, a zo labourerien euz ar gwella. Kent-se er Habili e kaver klezeier ha fuzuillou hag a zo labourer brao-tre. E-touez ar *Zowoua-ed* dreist-oll eo e kaver an houarn labourer brao, dantelezet oll, euz ar haerra a heller da gavoud; ha goulskoude an traou-ze oll a vez labourer gand ar gontell. Er vro-mañ e kaver an oll labourou, an oll vicherou, koulz lavared, a gaver e Breiz-Izel. Beza 'z eus mañsonerien, kilvizien, goved pe *marechaled*, houarnerien-gezeg, heskenourien-goad, kigerien, gwakolierien, Kêreourien, gwiaderien, poderien, toerien, tud evid ober loaou, plajou ha benvijiri all evid ar gegin. Kontilli ar Habili a zo heñvel euz gourglezeier, pe *dagou*: ar varvenn a zo dir tempset mad; an troad a zo greet gand koad ha kizellet euz ar haerra, leun a batromou naered pe anevaled all. Ar Gabiled o-deveus eur voest a vez gand ar gigerien e Breiz Izel o lakaad o hontilli diwaderezet. Ar gontell eo arm muia-karet ar Gabiled; en em zervich a reont outi alfez evid stourm pe evid en em zivenn ouz o enebour; morse ne yalfent er-mêz euz o ziez heb kaoud o hontell vraz ha ledan a-istribill ouz o hostez.

An darn vrasa euz tud ar Habili a zo labourerien douar ma ne vez ket pehed roi an hano-ze da eur vandenn strakerien burlu, pe dud didalvez ha ne labouront nemed peder pe bemp eur amzer bemdez, petra lavaran? beb tri dervez rag pa o-deveus labourer peder eur en eun dervez e chomont daou zervez all da gousked, pe da ehana. Hag a-hend-all ar Gabiled ne garont ket kalz muioh al labour eged ne ra an Arabed skwer an dud didalvez. Ar Gabiled ne labouront nemed evid mired da vervel gand an naon. Setu amañ gand peseurt benvijiri e reont o labour: ar bal, pe ar reñv; an trañch; ar pigell; eur vouhalig vihan, eur penn dezi evel eur vouhal, eun all evel eur bah pe eur hrog, hag a hañver evid se: bouhal-vah. Bez' ez eus ivez eur vouhalig all hag a hanver eur vouhal-bigel abalamour d'ar bigell a zo en eur penn outi. Bremañ pa em-bezo komzet deoh euz eun nebeud ferher koad, euz eun diou pe deir rastell koad, eur eur falz danteg evel eun heskenn, erfin euz eun alar kalz simplou eged an eler a vije gwelet e Breiz-Izel bremañ zo eun daou-hant vloaz bennag, eh anavezfoh oll benvijiri ar Gabiled.

Ar Gabiled n'o-deveus ket a gezeg; evid labourad o douarou e stagont daou ejenn euz an alar, hag e-giz ma kavont èsoh labourad gand an benveg-ze eged gand ar benvijiri all, peurvuia n'en em zervichont nemed outañ evid o oll labourou. Ar vouhal-bigell hag ar vouhal-vah, evel ma'z int skañv a renk ivez danevell ar muia.

Ne welfot memez, koulz lavared, den ebed er vro-mañ ha ne zougfe an daou venveg-ze war e ziskoaz, n'eus forz da beleh e yelo, ha ne vefe ket e soñj mond da labourad. Ar Gabiled ne hwennont morse o farkeier, n'o zeilont morse kennebeud. Troi an douar gand an alar war ar greun pa vez hadet, ha medi an éd pa vez aho, pa vez dare, setu aze tost da vad oll labour an douar er vro-mañ.

Pa en-deveus c'hoant unan bennag da gaoud eun tamm legumach bennag (pe louzou mad da zebri evid komz brezoneg c'hweg), neuze e kemer ar boan da en em zervich euz ar bal pe euz an trañch evid torri eur hornig douar: mez ne jomo ket re bell gand aon na zeufe da hlebia e deod en e henou gand ar hwezenn, pe da dana e zaouarn gand ar skuizder.

Setu amañ pere eo madou an douar dre ar vro-mañ: an heiz, ar gwiniz, ar herh, ar maiz pe gwiniz-Spagn, ar bechno pe sorgo, an ognon, ar piz-bihan, ar fao, an irvin, ar harotez, ar pour, ar pebr, ar

pivoena, ar hoton hag ar butun.

Er Habili ne gaver na segal na gwiniz-du, na melchen, na panez, na kaol, nag avalou-douar; na kalz traou all hag a hellfed kaoud êz-tre, mar karfed labourad; mez tud ar vro-mañ a gav gwelloc'h chom paour eged dastum danvez en eur labourad, en eur skuiza. Gouzoud a reont mad-tre e hellfent kaoud an oll draou-ze êz a-walh, mez abalamour o zadou-koz n'o-deveus ket hadet ar seurt traou-ze, pe evid lavared ar wirionez, abalamour n'int ket bet boazet d'en em skuiza o labourad, ne fell ket dezo digas kizou nevez er vro! Goude ar gernez pe naonegez arruet er bloavez 1867, ar gouarnamant a rannas etre tud ar vro eur guchennad vad a avalou-douar en eur roi urz dezo da hada lod en o farkeier. Mez an an dud-mañ a gavas re vad o avalou-douar, hag o debrjont oll, heb mired tamm ebed da hada, hag abaoe n'ez eus ket muioc'h a avalou-douar er Habili eged na oa a-raog. Tud ar vro ma n'ema ket ar giz ganto ken nebeud da hada boued-loened, hag e-giz ma n'o-deveus ket a foennijiri pe brajeier, eo red-mad dezo maga o loened gand kolo pe blouz ha gand yeod a hellont da gaoud e gwrimennou ar parkeier pe war ribl an hentchou braz. – honnez a zo eur yeotenn dreud – A-wechou e tastumont deliou fiez ha deliou gwez onn pe „ouenn“ evel ma lavarer e Kerne, evid roi d'al loened pa vez eet toud ar plouz. Mez mar ne gaver mui euz an deliou-ze, evel en hañv, ar paour-kêz loened n'o-deveus mui nemed eun dra da ober, krevi evel kelien gand an naon. Rag en hañv er vro-mañ e vez ken tomm ha ken nebeud a hlawijer, ma ne gaver ket eur yeotenn hlaz.

**Yann-Loeiz Normand**  
(da veza kendalhet).

#### **Planedenn**

Kelaouenn oll-vrezoneg  
o tond er-mêz peder gwech ar bloaz  
80 lur  
6, ru Longue Montroulez

## **Ar brezoneg war-gil <sup>(1)</sup>**

### **1.— Emgleo Breiz diwar-benn R.B.O.**

Emvodet d'an 2 a viz du, Bureo **Emgleo Breiz** e-neus sellet a-dost ouz stad a-vremañ an abadennoù brezoneg war ar radio hag an tele.

Evid **R.B.O.**, re anad eo ez eo eet war-gil an amzer implijet war ar post-se evid or yez. Tro peder eur nebeutoc'h beb sizun e pad bremañ an abadennoù brezoneg en e brogramoù p'o heñverier gand an amzer roet dezo e 81-82... Hag e oa al lodennig « profet » d'ar brezoneg d'ar mare-ze gwall gwall-bell euz kement a oa bet prometet dre skrid, dre gontrad, da zepartamant Penn-ar-Bed, da gêriou Kemper ha Brest (evid eun tamm mad a voujedennad!)

Hirio-an-deiz, an abadennoù « hir » a vez lakeet an oll anezou diouz ar par-daez, d'eur mare euz an deiz m'emañ ar peb brasa euz an dud er gêr o selaou ouz an T.V. N'eus nemed eur gronikenn a 15 munutenn (rik-ha-rak) e-pad ar mintinvez: a dalvoudgez eo, nemed re aliez e c'hoarvez dezi beza trohet krenn da 9 eur ½... A-hend-all, ar pennadoù keleier a zo bet digresket o niver ha kalz re verr int: ne houzañvont ket, a-dra-zur, beza lakeet e-keñver an 20 munutenn a veze war Radio-Brest, kent d'ar post-se beza mouget gand R.B.O.

N'eo ket gourhemennou eo a zo dleet da Renerien R.B.O. evid ar boan a gemeront evid or yez. Ken n'eo reiz tamm ebed ken an iz-ano a **Radio Breiz-Izel** kemeret gand R.B.O., ha n'eo nemed touellerez an « diouzegez » ma klask post Kemper en em bompadi ganti.

Ne baouezo ket **Emgleo Breiz** – gand ar strolladoù brezoneg all – da stourm evid ma vo roet d'or yez ar plas a zo dleet dezi war gwagennoù ar radio hag an tele, – eur plas hag emañ pobl Vreiz o houlenn hag o hortoz.

*(Pennad bet kaset da renerien ha kelaouennerien R.B.O., gand eur skrid e galleg. Klevet ez eus bet eur frazenn pe ziou euz hemañ; ger ebed avad euz or skrid e brezoneg).*

## 2.- War F.R.3

Beteg penn kenta an hañv tremenet, a-raog an ehanou-labour, e pade an abadennoù brezoneg **56 munutenn** en oll, beb sizun, lod anezo (ar heleier) e programou an teir chadenn, lod all, **Breiz o veva**, war FR3-Breiz nemetken. An teir abadenñ geleier (5 + 5 + 15 munutenn) a veze skinet d'eur mare deread evid beza klevet gand an dud echu o labour, deuz ar pardaez. **Breiz o veva**, avad, a zigoueze da 13 eur, d'eur mare fall: hini ar gelaouenn war TF1 koulz ha war A2, a vez troet ar peb brasa euz an dud da zelaou anezi.

Kemmet eo bet peb tra goude an hañv. Adal sizunvez an 10-16 a viz gwengolo, kresket eo bet eun disterra an amzer gouestlet d'an abadennoù e brezoneg, o tremen euz 26 munutenn da **1 eurvez 20 pe 23 munutenn** ar zizun. Siwaz, n'eus mui, koulz lavared, nemed **eun** abadenñ e brezoneg beb sizun, ha tra ken nemed war FR3, etre 13 eur ha 14 eur 20, **d'ar zul**. - diou pe deir munutenn bennag, mesket gand poziou e galleg, o veza implijet war ar zizun, e kelaouenn gomzet ar Rannvro... pa zigouez gand kelaouennerien Vrest kaoud eur helou, eur weladenn gand tud ouz o honta e brezoneg. Hag e klevet neuze ar re-mañ en or yez, eun droidigez e galleg o veza « iz-titret » war ar skramm.

A-dra-zur ez eus evel-se 24 pe 27 munutenn muioc'h a vrezoneg evid na oa kentoc'h, hogen ne glevet mui brezoneg war an tele nemed d'ar zul, rag eur fentigell n'eo ken ar momedig berr-kenañ, afiez trohet a-dammou, lezet d'or yez evid unan euz deveziou all ar zizun... Diwar nebeud-tre eta, setu **skarzet or yez euz ar programou-pemdez** m'he-doa, en eur ober ugent vloaz (1964-1984), tapet kaoud plas enno e-kichen ar heleier e galleg. Eur plasig gwall-skort da genta, - ho-pet soñj euz munutenn hanter Charlez ar Gall, e-pad bloaveziou, - eet war greski betek tost d'eun eurvez, - re nebeud, anad eo, nemed a veze implijet da rei da glevet brezoneg war ar skramm bihan **meur a wech**, deuz ar pardaez, war ar zizun.

N'hell den ebed lavared n'eo ket eur giladenn implij eun eurvez ugent en eun taol nemetken d'ar zul, d'eur houlez euz ar re falla, o terhel tra ken nemed 2 - 3 munutenn evid eun devez all, d'ober van chom heb dilezel a-grenn or yez deveziou all ar zizun... Setu evel-se **koulz ha disklabet** deuz ar brezoneg an « deveziou pemdez ».

E gwirionez, n'eo ket eet an Ao. Michel Le Bris, Renner nevez programou FR3-Roazon, da glask troiou evid dispaka abegou an dibab greeñt gantañ (hag asantet, anad eo, gand an hini a zo bet lakeet « e penn » ar programou brezoneg). Diskleriet e-neus d'eur helaouenner euz an « Tregor » (15 a wengolo; - trei a reom e brezoneg): « *(War dachenn ar brezoneg,) eur striv euz ar re*

*vrasa a zo bet greeñt, gand skoazell Kuzul-Breiz, p'e-neus hemañ roet deom eur yalhad a 700.000 lur. Red eo gouzoud e koust an abadennoù e brezoneg kerroh evid an abadennoù e galleg. Ar pemp munutenn e brezoneg a-raog ar gelaouenn (2) o-deus koustet deom kerroh c'hoaz: an nann-vrezonegerien a deh kuit war eur jadenn all ha n'o haver ket mui...»*

Setu perag eo bet klenket gand an Ao. Le Bris evid or yez eun toull-repu dizarempred e penn kenta endervez ar zul, p'emañ 90% euz an dud ouz taol, ha kalz anezo o selaou keleier ar mintinvez war postou all...

Ha gand-se, torret eo ar boaz kemeret gand an darn-vrasa euz ar zelaouerien da glevet brezoneg e-pad eur hrogadig amzer, peder gwech ar zizun, a-raog pe a-douez keleier-pardaez...

Pelloh en e gomzou, dizoloi a ra sklêrroc'h c'hoaz an Ao. Le Bris ar pez a zo war e spered e-keñver ar brezoneg ha sevenadur pobl-Vreiz: « *Ar zevenadur pobl, ne ran ket foultr-kaer gantañ. N'eus ket anezañ... Kondaoni eur vro d'ar folklor ha d'an traou pobluz, a zo kondaoni anezi d'ar maro. Hag evid ar yezou, beva ha mervel a reont, war-ze n'heller alñez netra.*»

Sed aze, hervez kelaouenn Lanuon, komzou unan euz ar re a oe e-touez kaserien-war-raog « Dispah 68 », hag eñ oberour **Occitania: volem viure!** - eul leor deut er-mêz deg vloaz n'eus ken, gouestlet da stourm an Oksitaned, n'eo ket hepken war an dachenn sosial ha politikel, hogen ivez evid o yez hag o sevenadur pobl, gand forz abegou « ideologiez » evel just... Nag a gemm etre ar Bris-se hag an aotrou dicheg a-vremañ, anezañ lakeet da benn-rener abadennoù Fr3-Breiz-Broioù-al-Liger, savet droug-ruz ennañ ouz an emzaviou breizeg hag o kas ar brezoneg en eur horn distro war ar gwagennoù skinwel evid eun abadenñ nemeti pa veze klevet kentoc'h pemp gwech bennag war ar zizun!

Beteg pegeid e vo red gouzañv eur seurt den e penn FR3-Roazon... ha beteg pegeid e plego dezañ ar Breizad krouer RTB, karget bremañ, hervez, da ren an abadennoù e brezoneg hag a houzañv ne ve roet d'or yez nemed aluzennig ar zul?

### 3.- War « Radio-France-Armorique »

Chom a ra deom da gomz euz ar pezh a reer evid ar brezoneg war ar post skingomz nevez adbadezet **Radio-France-Armorique**: pemp eurvez a vrezoneg beb sul, ha n'eo ket div eur nemetken evel ma lavaren e B.N.-78... nemed a oa gwir betek ar 5 a viz du. Nemed, taolom evez! An teir eurvez kenta a vez skignet war MF (103,01), etre 6 ha 9 eur deuz ar mintin, **d'ar zul**: gwall abred evid brezonegerien Vreiz-Uhel, rag ne vez klevet nemed e Breiz-Uhel. An diou eur all, etre 10 eur ha kreisteiz, a vez klevet, abaoe eun toullad bloaveziou dija war ar gwagennoù etre (O.M.: 422 m), **d'ar zul ivez**.

Eun dra vad evel just a-berz renerien nevez « Radio an Arvorig » beza krouet eun abadenn e brezoneg a-ratoz-kaer evid Breiz-Uhel, - da heul e-leiz a houlennoù, abaoe bloaveziou, a-berz brezonegerien an dachennad-ze euz or bro... Nemed eurveziou souezuz eo a zo bet lakeet d'an abadenn nevez: kalz re abred evel just eo kregi ganti da 6 eur beure... Ha **peb tra d'ar zul**, evel gand FR3... Kalz gwelloc'h e vije bet, war a zeblant, implij an teir eurvez-se kinniget da Vrezonegerien broioù Roazon, Sant-Malo, Foujera hag all... evid pennadoù, berhoc'h moarvad nemed da veza klevet da eurveziou kalz èsoh a-hed ar zizun. Eur gudenn stard marteze da zirouestla, anad a-walh eo, pa n'eo ket brezonegerien an darn-vuia euz Bretoned Breiz-Uhel. Evelato, eun diskoulm all estreged an hini implijet abaoe miz du a dle beza klasket ha kavet da gudenn bezañs ar brezoneg e programou radio ar zervij foran e Breiz-Uhel..

Ha kement ha komz euz R.F.A., goulenn a reer petra vez greet evid ar gallo war dachenn ar radio? Daoust ha klevet e vez yezh pobl Breiz-Uhel, gwech ha gwech all, en abadennoù savet evid an dachennad-ze euz or bro? Ha daoust ha ne vo ket krouet eur rummad abadennoù e gallo, evel m'her goulenner abaoe eur pennad mad?

\*\*\*

#### Dirag ar Gambri

Pa'z eus kaoz amañ euz radio ha tele, dleet eo lavared ez eus bet komzet euz an abadennoù e « yezhoù Bro-Hall » pe « yezhoù rannvro » gand Erwan Dollo, kannad Sant-Brieg, pa'z eo deut dirag Kambri ar Gannaded budjed ar pezh a anver ar « Helaoui dre Gleved ha Gweled ». Digaset e-neus E. Dollo da zoniñ d'ar Sekretour Stad G. Filloud unan euz ar paliou betek merket e lezenn gouere 1982 diwar-benn ar Skingomz hag ar Skinwel: « *kenskoazella*

*da gas war-raog personelezh ar rannvroioù gand douja d'o diazez sevenadurel hag istorel »*. Da lavared eo, da gomz sklêr, gand implij o yezh hag o hultur.

Goulennet e-neus or henroad petra deu da veza **Kuzulioù ar Hleved-ha-Gweled** da veza krouet e peb Rannvro, hervez al lezenn, ha daoust ha ne vo ket dileuridi evid « yezhoù Bro-Hall » e **Kuzul Broadel ar Hleved-ha-Gweled** koulz hag er « **Beli-Uhella** » (Haute Autorité), karget da evezia ouz oberiantiz ar chadennoù radio ha tele.

Roet eo betek gand Dollo skwer an abadenn vrezoneg koulz lavared nemeti, lakeet gand « FR3-Breiz-Broioù-al-Liger » d'ar zul goude 13 eur, ha pa vefe bet kresket eun tammig evel-se an amzer roet d'or yezh. Eun diskoulm fall eo evitañ da gudenn plas ar brezoneg e-barz ar programou. Red eo, e-neus lavaret, e vefe klevet **bemdez** ar yezh-rannvro war ar radio ha war an tele, o rei evel-se eun testeni anad euz implij foran koulz ha prevez ar yezh e buhez ar vro. An implij pemdezieg-se a zo eun dra da gaoud euz ar peb reta, eme E. Dollo, hag e hellfed kroui da nebeuta eun abadenn 15 munutenn a geleier e yezh ar Rannvro...

Oh echui ar gaou, e-neus pouezet kannad Sant-Brieg war an danvez-lezenn diwar-benn yezhoù ha kulturioù Bro-Hall disklêriet gand e strollad deputeed.

Ar Sekretour Stad, pe ne oa ket amzer gantañ... pe ne ouie ket petra lavared, e-neus respontet e skrivfe d'ar re o-doa greet goulennou outañ!...

A.K.

(1) Kendalh or pennad miz here.

(2) An abadennoù 5 mn e brezoneg a veze lakeet a-raog ar gelaouenn gomzet a 19 eur 20.

(3) *(Dans le domaine du breton), « on a fait un effort considérable, aidé par le Conseil Régional, il faut le souligner, qui nous a accordé une subvention de 700.000 F. Mais il faut savoir que les émissions en breton coûtent plus cher que les émissions en français et que les cinq minutes de breton avant le journal nous ont coûté encore plus cher: les non-bretonnants fuient sur une autre chaîne et on ne les retrouve pas »*.

(4) *« La culture populaire, je m'en fous. Ça n'existe pas (...). Condamner un pays au folklore et au populaire, c'est le condamner à mort. Quant aux langues, elles vivent et meurent, on n'y peut rien »*.

## Hag an danvez-lezenn 2157?

Da heul eun tamm pennad-skrid dam-hoapauz hag eur hiz parizian-tre dezañ, marteze savet da heul eun « dehadenn », eur « fui » (eur helou bet roet e kuzulig), ha bet embannet war « Libération » an 30 a viz here, setu m'eo bet lakeet ar vrud da redeg ne vefe ket merket danvez-lezenn ar P.S. war roll labouriou ar Parlamant... Dekrejou, avad, a vefe embannet da zeveni tammou 'zo euz an divizou merket e skrid an danvez-lezenn: eur « Huzul broadel yezou ha kulturio Bro-Hall », hag eur Huzul evid peb yez a vefe krouet, ha « reolennou nevez » o tenna d'ar Helenn ha d'ar Hleved-ha-Gweled (Radio ha TV) a deufe er-mêz... ne lavarer ket pedavare...

N'eo ket souez e vefe deut gwall brederiet diwar-ze an emzavioù a boagn, amañ e Breiz hag e broiou Oksitania, Euskadi hag all, gand soñjal:

1) da genta, e hellfe beza bet disklêriet danvez-lezenn 2157 ar P.S. – ha kerkoulz danvez-lezenn 2321 ar P.C. – en aner... eur wech all, da heul eun tregont bennag a skridou bet embannet abaoe 1958...

2) petra vezo lakeet en dekrejou a vefe kaoz d'o frienti, rag ne zeblant ket e vefe deut ar mare ma vo sanket e pennou uhelidi ar ministereziou ar menoz gwarezi ha, nebeutoh c'hoaz, kas or yezou war-raog...

Evid e Breiz, o veza emvodet e Plañwour d'an 3 a viz du, an dileuridi euz c'hweh a emzavioù sevenadurel brezoneg o-deus kaset eul lizer stard-mad da zeputeed socialist Breiz, o rei dezo da hozoud pegen estonet ha drougkontant emañ o strolladou gand ar helou e vefe dilezet menoz al lezenn a rote eur stern deread ha da vad da implij yezou ha kulturio Bro-Hall. En em houlen a reont petra hello beza lakeet en dekrejou a vefe e soñj embann. Sevel a reont a-grenn ouz ar menoz e vefe troet kein d'ar pezh zo bet embannet kentoh ha rag-se goulennet o-deus gweled dileuridi ar gannaded P.S.. Sinet e oa al lizer en ano « Ar Falz », « Diwan », « Kendalc'h », « Kuzul ar Brezhoneg », « Skol an Emsav » hag « Unvaniezh ar Gelennerien ».

N'o-doa ket gallet dileuridi « Emgleo Breiz » mond da vodadeg Plañwour. N'eo ket chomet avad tud E.B. heb rei da hozoud e leh ma tleer ar pezh a zoñjont deuz eur vrud ha ne zeblant ket e vefe faoz penn-da-benn...

Dleet eo lavared n'eur ket chomet difiñv ha dilavar kennebeud diouz tu kannaded or bro. E Kambr an Deputeed, an Ao. Dollo, hag eñ bet karget da zavel ar skrid diwar-benn an danvez-lezenn 2157, e-neus, dre zioù wech, d'ar 7 ha d'an 12 a viz du, digaset da zoñj dirag ar gannaded hag ar vinistred

ez eus bet goulennet eur wech muioh eur statut a-zivoud kas war-raog yezou ha kulturio Bro-Hall. Ha pouezet eo bet gand an Ao. Dollo war an nehamant savet a beb tu gand ar vrud ne deufe ket dirag ar Parlamant al lezenn bet prometet.

Dipituz-tre eo bet avad respont an Ao. Chevènement, ministr an Deskadurez Vroadel, da gannad Sant-Brieg. Eur ger bennag e-neus lavaret diwar-benn ar pezh a zo bet greet abaoe 1981 e-keñver yezou ha kulturio Bro-Hall (li-sañsou, krouidigez postou), nemed disklêriet 'z eus bet gantañ e ranker kompren koulz ar re a gav dezo e roer re evid ar yezou ha kulturio-ze hag ar re all a zoñj ne vez ket greet tra-walh! Eur respont laosk-kenañ hag a lakfe da gredi e vefe tostoh ar ministr deuz ar re genta evid deuz ar re all, hag emañ dindan levezon kargidi 'zo endro dezañ hag e ouier n'int tamm ebed a-du gand ar statut reiz goulennet evid ar brezoneg hag ar « yezou rannvro » all...

Diouz e du e-neus diskouezet ar B.R.E.I.S., ar huzul m'emañ an Ao. Joselin en e benn, beza prederiet gand peseurt a deuo ar mennad-lezenn sinet gand deputeed Vreiz ar P.S.... Roet 'z eus bet gantañ eur pennad-skrid d'ar helaouennou o venegi ar helou o rei da gredi e vefe pellaet ar gaoz dirag ar Parlamant diwar-benn an danvez-lezenn 2157. Dirag ar B.R.E.I.S. e-neus bet tro an Ao. Dollo da lavared e vefe heb dale eur vodadeg etre ar vinistred o-devefe dekrejou ha kemennadureziou da embann e-keñver yezou ha kulturio Bro-Hall. Daoust da ze, hervez an Ao. Dollo hag ar B.R.E.I.S., ezomm he-deus ar vro euz eur vreuradeg, eun « débat » da vad, diwar-benn ar gudenn-ze, **red ma'z eo, emezo, kaoud eul lezenn**. Re a zigomprenusted a jom... Promesaou a zo bet embannet ha seveni anezo a dleer (1).

**Notenn:** Pa gomzer euz studi an danvez-lezenn 2157, disklêriet gand ar P.S., arabad e vefe chom heb selled ivez ouz an danvez-lezenn 2321, disklêriet gand ar P.C.F.

Ha daoust ha gwir eo e vefe, a-hend-all, eun trede skrid mennad-lezenn hag a hellfe beza disklêriet gand eur gostezenn all... hag a vefe da veza studiet ivez emichañs?

**B.N.**

(1) Embannet eo bet ar peb brasa euz pennad-skrid ar B.R.E.I.S. war « Ouest-France » an 28 a viz du.

## Kanaouennou nevez evid ar re yaouank

gand an  
« Tregeriz »

Setu aze ano an eil leorig kanaouennou bet savet ar zonerez anezo gand an **Tregeriz** ha gand **Fañch Danno**. Deuet eo er-mêz pemp ploaz war-lerh an hini kenta a oa bet embannet gand **Ar Heleñner** da geñver Bloavezh Etrevroadel ar Vugale.

37 kanaouenn nevez en oll, an tri-hard anezo e brezoneg, a gaver ennañ, renket e tri rummad: da genta, ar re bet savet gand **Per-Mari Mevel** ha goude ar re bet kinniget gand **Soazig Noblet** hag ar re savet pe ginniget gand **Fañch Danno**. War-dro an hanter anezo a zo enrollet war eur vinikasetenn a heller prena gand al leorig, ar pezh a êso labour ar skolêrien na ouzont ket lenn ar muzik re vad. Ne vez kavet warni nemed poziou 'zo eur peb kanaouenn. Domaj eo n'int ket er memez urz hag el leorig.

Eün eo ar hanaouennou evel-just, daoust ma vo kavet eun nebeud anezo diêzig a-walh da gana gand ar re yaouank-tre; lies-seurt eo o stummou, ha gwriziennet int peurvuia, med paz atao, e sonerez hengounel or bro: kavoud a reer stummou ar hanaouennou da zañsal (an dro, laride, jimnaska, polka piket...) ha stumm an ton-bale « ledan » (An dugez Anna, Bloaz danvez ar vro, Deus endro d'ar gêr, eun ton-bale a stourm o tisplega pegen plijuz eo dond da veva e Breiz goude « beza eet skuiz gand buhez sod Pariz ». Beza 'zo ivez toniou gwerz evel « Lina », unan euz brava kanaouennou an dastumadenn. « Ti Yannig » bet savet war framm « Gousperou ar raned » pe c'hoaz « Ar voualh », da lavar-red eo ez eus e peb poz eul linenn muioh eged er poz a-raog.

Lod euz ar hanaouennou n'int bet savet nemed evid kelenn brezoneg d'ar vugale: « Son an ti nevez » da skwer, 30 poz enni; gand unan diwar-benn peb micher a ra war-dro eun ti nevez, e heller en em houlenn hag-eñ ne skuizint ket re vuan o teski anezo, eun tammig re sistematik e seblantont beza memestra. Beza zo c'hoaz kanaouennou fentuz evel an hini diwar-benn darvoudou

« Mimi Kermor » a laka an oll da grena p'ema o kas he gwetur war an hent braz hag ivez eun nebeud kanaouennou hengounel ha n'int ket bet enrollet.

War ar vinikasetenn e heller klevet **Frañseza Riou** o kana, eilet gand **Soazig Noblet** ouz an delenn geltieg; brao-tre eo o labour, distaget mad eo ar frazennou, ar pezh a zo pouezuz-kenañ; gwelloc'h e vije bet c'hoaz m'o-dije gellet implij binviji-sonerez all a-wechou: o klevet an delenn ingal e seblant an toniou beza heñvel, memez ma n'int ket e gwirionez. Moarvad o-doa soñjet e se, med n'o-deus ket bet tu d'hen ober.

Ne vez ket savet kalz a ganaouennou brezoneg evid ar re yaouank: gand an dastumad-ze eo kresket eun tamm choaz ar gelennerien. M'am-ije skol brezoneg da vugale yaouank da ober e choazfen eun nebeud toniou ennañ evid kavoud danvez tostoh ouz or buhez pemdezieg hag ouz on doare-ni da zoñjal; med n'eo ket ablamour da ze e tilezfen a-grenn ar hanaouennou hengounel.

Spil am-eus e vezo desket eun nebeud euz ar hanaouennou nevez er henteliou brezoneg; kana zo eun doare disheñvel eun tamm da zeski eur yez, med dreist eo evid lakaad mad an taol-mouez. Salv ma vezint kanet er skolioù, er gêr ha klevet er beilla-degou hag ivez er honkourioù evel **Kan ar Bobl**, da skwer.

J. Goyat.

### Agenda 1985 Brud Nevez

Priz: 15 lur  
(da houlenn war-eeun digand Brud Nevez)

## Barzoniez skeudennaouet.

Breiziz 'zo a hellfe ober tro ar béd, ha distrei d'ar gêr heb netra da lared diwar-benn ar zevenaduriou o-defe kejet ganto. Evel ma vijent bet chomet o buhez-pad e Toull-tro pe e Kernetra.

Hiniennou a gar ober cholori gand dollardou o chakotou; unan bennag a bign e « baradoziou », bet kuzet ganto, marteze, e seuliou o botou.

Reou all o-deus displeget, e brezoneg, dremmweliou ha buhez or breudeur en tu all d'ar mor don. Diwar o darempredou, eo chomet stag ouz o ene, o spered, eun dra bennag euz oablou, giziou, lennegeziou, disheñvel-kaer a-wechou diouz or re-ni. Prenesti o-deus digoret evidom; gand plijadur o-deus dizoloet eur homig euz teñzor o havadennou hag estlammou.

**Youenn Brusk** a zo euz ar ouenn-ze: plijet e-neus dezañ arz ar Reter-Pella, ha fellet e-neus dezañ ober gantañ e yez hag e « liou ar vro » (p. 81). Savet e-neus tresadennou, e gwenn ha du, hervez doare japaniz, o klota gand **Eun haykou bennag**.

Haykou?... Er XVIved kantved, e « Bro an Heol o Sevel », ez eur kroget da ober gand eun doare c'hoari spered: displega eur menoz, pe kroui eun daolenn, e teir gwerzenn (5 + 7 + 5) ha seiteg silabenn en oll (« Kam-nap » ar Hambodj a dennfe dezañ). Setu ar pezh e-neus greet **Y. Brusk**, goude arvesti ouz ar mor, an amzeriou, ar haz, ar balafenned, h. a... Seblantoud a ra kared an noz – marteze dre m'eo eur mare mad evid sevel eun haykou? – Da skwer, mouskanit gantañ:

« Voulouz du brodet  
gand ar broder nemetañ.  
Kenedusad noz! » (p. 57)

It d'e heul beteg an aot ha sellit gantañ ouz

« Ruster ar homog,  
ar mor o tiwada:  
tremenvan an deiz. » (p. 7)

**Brud Nevez** e-neus moulet kaer an oberenn, gand pennlizerennou dispar. Plijadur ho-po, sur, c'hwi ivez, oh ober anaoudegez « gand ar stêr » (p. 57)

Euunded lemm – gwenn, du, –  
'tal berded ar varzoneg:  
provou Youenn Brusk.

**K. Riou.**

**Leoriou ar miz**

**Fañch Broudig**

**Langue et littérature bretonnes  
Bibliographie: 1973-1982**

Une vue d'ensemble de la production écrite concernant la langue  
et la littérature bretonnes depuis dix ans

Priz: 45 lur

**Emile Ernault**

**Geriadurig  
Brezoneg-galleg**

Eil moulladur

Priz: 90 lur

## a beb seurt – kemennou – leoriou – keleier – a beb

### Prizioù lennegel

Priz ar *Rencontres poétiques de Bretagne* a zo bet roet da **Vaodez Glanndour** hag hini ar **S.P.A.F.** da **Naig Rozmor**. Or gwella gourhemennou dezo o-daou.

#### Jarl Priel

D'ar zadorn 12 a viz mae 1985 e vo aozet eun devez braz gand **Kevedigezh ar Skrivagnerien** (Ronan Huon o veza e penn) en enor da **Jarl Priel**, e Priel e-kichen Landreger. Dizoloet e vo eur blakenn-ennor.

### Priz Per Trepos 1985

Galvet eo ar vrezonegerien da gemer perz e kenstrivadeg **Per Trepos**, hag evid se, da zevel eun destenn hg a hellje goude-ze beza displeget e-kerz eun abadenn radio vrezonég.

Gand an destenn a vo kinniget, e ranko beza peadra d'ober eun abadenn 20 munut pe war-dro. Bez' e hell pep hini dibab dindan peseurt stumm kinig eun destenn, ha bez' e hell beza: eur gontadenn, eun danevell, eur pezh-c'hoari, eun diviz, eur sketch, eun displegadenn (diwar-benn eur vro, eun den, eun danvez bennag), eur renta-kont beaj, eur pennad istor, hag all...

War-eeun e tle beza savet an destenn e brezoneg, hag arabad eo e vije troet diwar eur yez all bennag, na kennebeud adskrivet na kempennet diwar eur skrid all bennag. Benn ar 15 a viz genver 1985 eo ema ar skridou da veza kaset. War-lerh, en em vodo ar juri hag a vo karget da weled da biou rei ar priz. Ar re o-devo bet prizioù, a vo displeget o skridou goude-ze e-kerz eun abadenn vrezonég.

Daou briz a zo da hounid e 1985, unan kenta a 1.500 lur, hag eun eil a 750 lur.

Da gaoud reolennoù ar honkour, e ranker skriva da: **Radio Breiz-Izel - Priz Per Trepos**, rue de Falkirk, 29000 Kemper.

### Roll ar re o-deus bet gounezet Priz Per Trepos

- 1976: kenta priz: Yann Biger; eil priz: Korantin Riou.
- 1977: kenta priz: Kristian Brisson; eil priz: Huguette Gaudart.
- 1978: kenta priz: Jean-Claude Miossec; eil priz: Korantin Riou.
- 1979: kenta priz: Anjela Duval; eil priz: Goulven Jacq.
- 1980: kenta priz: Youenn Brusq; eil priz: Kristian Brisson.
- 1981: kenta priz: My Skaouidig; eil priz: Goulc'hen Kervella.

### Abadennoù brezoneg war radio Bro-Leon

O chom e Bro-Leon emaoñ, ha troet oh gand yez ho pro. Daoust hag anavezoud a reoh **Radio-Bro-Leon**? Eur radio lehel a zo he skingaserez e Lez-neven ez eo. Klevet e vez êz a-walh en eul lodenn vraz euz Bro-Leon, beteg Brest, Landi, tost da Gastell... Gwella deoh eo ober eun taol-êsa: 103,4 Mhz eo an hirder, war M.F.

Eurvez ar brezoneg 'zo etre eun eur ha div eur bemdez, nemed d'al lun. Beb seurt a vez, ha kalzig sonerez evel just, med traou all: pennadou-kaoz, renta-kontou, istoriou. Kement a vez war ar radio, kwa.

"Gand tud euz ar vro e vez greet an abadennoù-ze. Gand Ivona Pennors, euz an Drenneg, Kristina Abiven euz Lanarvili, ha dreist-oll gand Soazig « Mamm Diwan » Lavanant, euz Plabenneg. Bemdez eta, etre kreisteiz hag eun eur. Ano 'zo ivez e teufe Goulhan Kervella.

Eun abadenn diouyezeg a zonerez keltieg a vez ivez da lun da noz, etre eiz ha nav eur hanter. An niverenn bellgomz eo 83.36.84 (pe 83.36.30 hervez al leor pellgomz!).

On gwella gourhemennou d'ar vrezonegerien galoneg-ze. Ha mard emaoñ e Bro-Leon o chom, arabad deoh damanti na pizmiga ma vez goulennet sikour diganeoh. Kemer perz en eun abadenn eun eurvezig da veza klevet gand meur a zen n'eo ket eun dizenor, ar hontrol eo. Ha ma 'peus c'hoant kemer perz, arabad chom war-dreñv. Skriva a hellit ivez da: **Radio Bro-Leon**, plasenn an Europ, 29260 Lezneven.

### Bale ar zul

Evid eun dro-vale e pedom ahanoh beb sul vintin. O anaoudegez euz istor Breiz a hellit diskouez en eur hoari ganeom. Med Breiz a-vremañ a adkavit

ivez, buhez ar Vretoned, al lennegez vrezoneg... Digarez ho-po da vizita broiou all ivez. Eur wech ar miz eo e kompagnunez eun den brudet ez eoh da vale war vourz eur fuzeenn a gaso ahanoh etrezeg ar stered...

Digarez e vo dezañ konta deoh e vuhez, lakaad ahanoh da glevet ar pemp pladenn en-deus choazet kas gantañ...

Arabad ankouaad kennebeud Porz ar vugale, eun abadennig evid ar vugale gand divinadellou ha bugale o kaozeal brezoneg.

Diou eurvez plijadur eta gand sonerez ar vro hag hini ar broiou keltieg all.

Gand **Mikael Baudu** e vez savet an abadenn.

Beb sul vintin war **Radio-Arvorig**  
Gwagennou etre (422 m) etre 10 eur ha kreisteiz

## Prosper Proux

Savet zo bet eul leor nevez diwar-benn **Prosper Proux** gand **Ifig ar Berr**, **Yann an Du** ha **Fañch Morvannou**. Embannet e vo gand Skol-Veur Vrest. Kavet e vo e-barz buhez Prosper Proux, eur studiadenn diwar-benn e vrezoneg, hag eur studiadenn lennegel. Adembannet e vo e oberennou ha lizerou. 330 pajennad a zo el leor. Tu a zo da ragprena anezañ beteg an 20 a viz kerzu, evid 120 L (145 lur e kousto goude). Skriva da **Skol-Veur Vrest**, Kevrenn al Liziri, av. Le Gorgeu, Brest.

## Eskemm kelaouennou ha leoriou?

Eskemmet e vez ar gelaouenn Brud Nevez gand meur a gelaouenn all, pe e vefe skipaill Brud Nevez a-du pe kontrol d'ar menozioù displeget amañ hag a-hont.

Kaset on-eus a-viskoaz ol leoriou da Ouest-France, Le Télégramme, Vivre au Pays, Al Liamm, R.B.I. ha FR3 Roazon, ha, nevez 'zo da Skol an Emsav he-deus kaset dim n'eus ket pell leoriou on-eus komzet anezo, pe a reom e-barz an niverenn-mañ euz Brud Nevez.

En eheb, a-viskoaz e-neus nahet rener Al Liamm eskemm pe ar gelaouenn pe al leoriou ganeom-ni, daoust m'on-eus savet aliez pennadou hir diwar-benn al leoriou bet moulet gantañ.

Neuze, na souezet on bet p'am-eus lennet war Al Liamm, niverenn 226, pajenn 294, dindan sinatur P.B. (Per ar Bihan - kaset e-noa dim e leor barzonegou, ra vezo trugarekaet): *«A-du-krenn eo Ronan Huon evit kas ur skouerenn eus ar gelaouenn pe eus al levrioù embannet d'ar c'helaouennoù all, ma vezont a-du evit ober meneg eus ar skridoù-se en o fajennoù ivez.»*

Ha me, laouen-laouen, da skriva dioustu da Ronan Huon... ha setu e respont: *«Daoust d'ar pezh a lavar P.B. e-barzh A.L. eo gwelloc'h ganin derc'hel d'ar statù quo er mare-mañ.»*

Ma!

## Embannadurioù « Skol an Emsav »

Lom er Foar.

Adkavoud a reom gand kement a blijadur or mignon yaouank **Lom**, o vond ar wech-mañ da bourmen er foar gand e familh. Pebez plijadur evid pep hini anezo, bihan ha braz!

Eul levr skeudennet brao gand Violetta Denou, liviou brao war beb pajenn, buhez ha plijadur war beb skeudenn.

Eun istor e brezoneg eeun, evid bugale etre 5 ha 10 vloaz. Ar re vihan (2-5 bloaz) a vo plijet gand tresadennoù ken leun a vuhez, ha laouen oh adkavoud o mignon Lom bepred ken hegarad ha jentil.

Evel peb bloaz, eun agenda zo bet moulet gand **Skol an Emsav**.

## Skridoù gwenedeg a-vremañ

Moulet zo bet, gand **Hor Yezh**, daou leor e gwenedeg nevez 'zo: **Grand-dictionnaire français-breton du dialecte de Vannes**, gand **G.L. Guilloux** hag **Hor bara pampiek**, gand ar memez oberour.

Gouzoud a reer n'eus ket kalz a dra bremañ e gwenedeg, mez eun tammig dre faot ar Wenedourien an hini eo. En niverenn diweza euz Brud Nevez em-oa goulennet tud evid adskriva skridoù gwenedeg gand an Aotrou Heneu n'int bet moulet biskoaz! Respont ebed! Marteze e vo gand an eil goulenn-mañ? Da hortoz eh alian ouzoh da brena daou leor G.L. Guilloux.

Souezet on bet memestra o weled Hor Yezh, a zo e „penn“ ar „peurunvan“ oh embann skridoù gwenedeg a-vremañ gand doare-skriva Dihunamb a-raog ar brezel 14!

## Staj studi

D'ar zadorn 29, d'ar zul 30 ha d'al lun 31 a viz kerzu e vo greet eur staj diwar-benn

**Brezoneg, yez on dazond  
petra ober? penaoz ober?**

Renket e vo ar staj gand **Skol an Emsav ha Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien**.

## Piou zo prest da labourad?

**Geriadur braz:** Ezomm eun hanter-kant bennag a dud a zo evid c'heari gand sizailloù ha peg (tu a zo da adskriva, ma kavit gweloh), evid skoazella ahanom da zevel or geriadur braz. N'eo ket d'fêz al labour d'ober, tamm ebed. Ouspenn, n'eo ket red beza eur maill war ar brezoneg. N'eus ket ezomm kalz amzer. Ma'z eus tud a-walh a lakfe o ano, e vefe greet al labour en eur zizunvez.

Tud zo a zo krog gand al labour. Perag ne rafeh ket kemend-all?

**Une poignée d'ajoncs,** gand **Louis Priser**. Piou a vefe prest da lakaad al leor-ze e brezoneg?

## Kelou mad evid tud Vrest!

**Klevet ho-peus dez Ar Bed Keltieg,** stal vrezoneg Kemper, ha tro ho-peus bet ivez, emichañs, da vond beteg eno d'ober ho fri-furch ha diskoacha al leor brezoneg, an disk pe ar pezh artizanelezh keltieg a ree diouer deoh ha n'ho-poa kavet e leh all ebed.

Kelou mad am-eus da gemenn deoh: n'ho-po ket mui d'ober hent: pourchaset e vo deoh peb tra en ho kêr gand ar stal nevez **Ar Bed Keltieg** plasenn Guérin (karter St Varzin), adal ar zadorn 8 a viz kerzu. Eun degemer euz ar gwella hag ar brezoneka ho-po.

## hag e Montroulez

**Ti Kornog!**

C'hwi hag a anavez or stal, oh sur da gaved enni levriou, pladennoù hag artizanelezh euz an dibab, war danvez Breiz.

## Asamblez ez aim pelloh

Koumanantit da Gornog dre gartennoù a roio deoh 10% a zistaol ar bloavezh-pad:

200 lur - 10% e-pad ar bloavezh beteg 3.000 lur.  
500 lur - 10% e-pad ar bloavezh beteg 6.000 lur.  
1.000 lur - 10% e-pad ar bloavezh beteg 12.000 lur.

## Strollad ar Vro-Bagan

A zo foug ennañ o lavared deoh  
En-deus paket e zeg vloaz!  
Pedet oh d'ar gouel  
D'ar zadorn 22 a viz kerzu  
Plougerne, Sal ar sportou.

Deuit gwisket war zoare ar peziou  
Ho-peus kavet ar gwella!  
Leun a draou a vo da hounid!

Boueta koko da zeiz eur!  
Dalhit ho plasou evid ar pred!

**ABADENN VEUR DA 9 EUR:**  
Muzik, dañs, kanaouennoù, teatr mesk-ha mesk.

**HANTER-NOZ E PLOUGERNE:**  
Beh d'an dañs!  
**HILARE CARHAISIENNE! BAGAD SANT-MARK!**  
**STORLOK! STLABEZ!**  
**BOB'S ROCK!**

*(Evid debri, telefonit da genta d'an 83-42-64 pe d'an 04-50-06).*

## Skol Uhel ar Vro

### Bodadegoù da zond

#### Miz kerzu 1984

D'ar zadorn 8 da 14 eur e Brest: Kevrenn an darempredoù Etrekeltieg.  
D'ar zadorn 15 da 10 eur 30 e Brest (C.R.B.C.): Kevrenn al lennegezh dre skrid  
D'ar zadorn 15 da 14 eur e Roazon (La Paillette): Kevrenn ar zonerezh.  
D'ar zul 16 euz 15 eur da 17 e 30, e Brehan (e-kichen Rohan): 500 ved  
deiz-ha-bloaz ar moulla e Breiz.

#### Genver 1985

D'ar zadorn 5 da 14 eur, e Roazon (Ensavadur Arvorigad): Kevrenn an istor.  
D'ar zadorn 5 da 14 eur e Roazon: Kevrenn al lennegezh dre gomz.  
D'ar zadorn 12 da 10 eur 30 en Oriant (Palez ar Hendarhiou): Kuzul skiantel.  
D'ar zadorn 19 e Sant-Brieg: Kevrenn an etnografiezh.  
D'ar zadorn 19 da 14 eur en Naoned: Kevrenn an Arz hag an tisaverezh.  
D'ar merher 23 e Roazon (Ti ar Zevenadur): Digoridigezh ofisiel an diskouezadeg  
vraz « ar mên-meur en Arvorig ».  
D'ar zadorn 26 da 10 eur 30: Kevrenn an natur hag an endro.

#### Miz meurzh 1985

D'ar zadorn 9 da 10 eur e Gwengamp: Kevrenn ar ragistor hag an hendraoueriezh.

### Darvoudoù sevenadurel da zond

9-17 a viz meurzh 1985: Foar al levr e Bruxelles.  
22-27 a viz meurzh 1985: Saloñs al levr e Pariz.  
25-31 a viz meurzh: 6ved Festival ar filmoù hag ar skinwel er broioù keltieg.  
6-7 a viz ebrel: Kan an Bobl en Oriant.  
13 a viz ebrel: Scrif-Celt' 85, e Londrez.  
25-27 ebrel: 1.500ved deiz-ha-bloaz krouidigezh abati Landevenneg.  
26-28 a viz ebrel: 5ved Festival al levr e Breiz, e Sant-Brieg.  
12 a viz mae: 100ved deiz-ha-bloaz Jarle Priel, e Priel hag e Landreger.  
31 a viz mae, 1-2 a viz even: Saloñs al levr en Naoned.  
23 a viz gouere: Gouelioù Kerne, e Kemper.  
22 a viz gouere - 4 a viz eost: « Interkelt », e Boston, U.S.A.  
2-11 a viz eost: Gouelioù etrekeltieg an Oriant.

*Evid gouzoud muioh, skriva da Skol Uhel ar Vro, 3, ru Martenot, B.P. 66A  
35031 Roazon Cedex.*

